


# imbourenn



N i v e r e n n 55-56

31 E o s t 1 9 7 4

I M B O U R C ' H ,    K E L A O U E N N    B O L I T I K E L

Pempvet bloavezh

Niverenn 55-56

31 Eost 1974

Raklavar.....p.211

Un damsell war istor Kembre.....p.213

---

Koumanant-bloaz : 30 lur. K.R.P. Y. Ollivier. 1534 25

Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 8 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud,

35 000 - Roazhon

CPPP : 50 015

RAKLAVAR

Ar skrid-mañ a zo an hini kentañ eus ur rummad skridoù a glasko displegañ istor ar broioù hag an emsavioù keltiek. Dezrevell a raimp er skridoù-se pennañ darvoudoù istor pep bro geltiek en ur ouzhpennañ un nebeut prederiadennoù e ser an darvoudoù-se. Anat eo ne vo kinniget ar prederiadennoù-se nemet evel un danvez emsoñjal nemetken.

Steuenn an oberenn-mañ a zo da gavout en ul levrig aozet e saozneg gant John Edward Lloyd, un istorour kembreat par a-walc'h da La Borderie, ha lakaet e kembraeg gant R.T. Jenkins ; an talbenn anezhañ e kembraeg a zo "Golwg ar hanes Cymru".

Re hire vefe sevel ul levr lennadur eus istor Kembre, ken e saozneg ken e kembraeg. Em levr-se ez eus un toullad skridoù o tennañ da istor Kembre, bet lennet pe zamlennet ganin, hag a c'hellan menegiñ amañ :

"Llywodraeth y cestyll" ("Levierzh ar C'hestell") gant Ambrose Bebb, a-zivout Kembre ar grennamzer ;

"Cyfnod y Tuduriaid" ("Prantad an Dudured") gant Ambrose Bebb, diwar-benn dibenn ar XVvet ha deroù ar c'hwezekvet kantved e Kembre ;

"Cymru a'r hen ffydd" ("Kembre hag ar feiz kozh") gant Emyr Gwynne Jones a zispleg penaos e steuzias ar feiz katolik diwar zouar Kembre er c'hwezekvet kantved ;

"Hanes Cymru yn y ddeunawfed canrif" ("Istor Kembre en triwec'hvet kantved") gant R.T. Jenkins ;

"Hanes Cymru yn y bedwaredd canrif ar bymtheg" ("Istor Kembre en XIXvet kantved") gant R.T. Jenkins.

Bez e c'hellan menegiñ ivez un nebeut skridoù all, - da skouer un damsall war istor Kembre gant Gwynfor Evans : "Aros mae" hag un nebeut buhezskridoù : hini Pantycelyn ("William Williams") oberour ha barzh al luskad metodistat e Kembre en triwec'hvet kantved ; an talbenn anezhañ a zo "Y per ganiedydd" gant Gomer Morgan Roberts. An hevelep skrivagner en deus savet ivez buhezskrid Howel Harris, unan eus diazezerion ar vetodistiezh e Kembre : "Portread o ddiwygiwr" ("Poltred un adreizhour". Emañ em c'herz ivez ur



pezh-c'hoari diwar-benn Howel Harris bepred gant ar  
romantour Islwyn Ffowc Ellis.

Ken dizesk eo Breizhiz avat maz eo diaes  
goulenn diganto plediñ gant istor ar broioù keltiek ;  
ne c'usont, koulz lavaret, netra diwar-benn istor o  
bro end-eeun. Poent e vefe dezho, koulskoude, klask  
anavezout un nebeut fedoù a-zivout ar bed keltiek ma  
fougasont bezañ izili anezhañ, anez dezho asantiñ da  
vezañ - hepmuiken - Gallaoued droch oc'h ober - Doue  
a oar perak - gant ur yezh varv e sell d'ur vroad n'eus  
ken anezhi ; sed dres pezh a c'hoarvez avat gant ar  
stourmerion a ra gant ar yezh en ur glask danvez o  
stuziadur er bed kefredel gall hepken.

Y.O.

=====

Notenn diwar-benn an anvioù -  
lec'h

O vezañ m'em eus implijet, nemetken, levrioù  
kembraek da sevel ar skrid-mañ em eus miret stumm  
kembraek an anvioù-lec'h ; daoust maz eo c'hoarvezet  
gant F. Vallee hag un nebeut skrivagnerion all  
brezhonekaat an anvioù-lec'h- mañ evel Kêrdiz h.a.  
em eus kavet furoc' d'erc'hel ar stummoù kembraek  
o c'houlakaat ez eo ar c'hembraeg yezh kefridiel  
Kembre.

Ur gudenn a save e ser un nebeut anvioù  
kêr eus Bro-Saoz a zo bet meneget amañ dindan o doare  
Kembraek : Caergrawnt evit Cambridge, Caergaint evit  
canterbury ha Rhydychen evit Oxford ; evit an anv  
diwezhañ-mañ ez eus bet implijet a-wechoù un doare  
brezhonek : Redec'hen ha n'em eus ket adkemeret ;  
en eneb, em eus arveret "Lunden" diwar "Llundain"  
o vezañ m'eo bet implijet aliesik ar stumm-se  
e-barzh skridoù zo.

Moarvat e vo un divizadur da gemer e ser  
an anvioù-lec'h en estrenvro ; darn a zo a-du evit  
ober hepken gant an anvioù kefridiel. Ret mat eo gwiriañ  
avat e kendalc'h ar C'hallaoued da skrivañ "Londres",  
Vienne" h.a. D'ar c'houlz-se, ne welan perak ne virfe ket  
ar Vrezhonek stummoù zo dezho o unan evit envel  
ar c'hêrioù e Bro-C'hall pe er broioù all.



UN DAMSELL WAR

I S T O R K E M B R E

I. A R R A G I S T O R

Etre ar bloavezhioù 3.000 ha 2.000 K.H.S. e oa goloet Kembre gant koadeier. Er grez-se e vleunie sevenadur ar peulvanoù. Goulakaat a reer e oa bet dalc'het tiriegezh Kembre gant ur boblañs a ouenn atlantel-kreizdouarek he devoa aloubet Arvorig ivez d'an ampoent.

Adal ar bloavezh 2.000 K.H.S. e krog ur sevenadur arall a zo azonet gant kenderc'hadur bouc'hili ha priajoù nevez ha giz an devañ-korfoù.

E 1.000 K.H.S. hepken, e stagas ar Gelted da aloubiñ an Inizi Predenek ha Kembre peurgent, o tegas ganto implij an houarn. Padal n'en em ledas ket ket diouzhtu ar gounezerezh-ed e Kembre, war a seblant; meneziek eo Kembre ha chom a rae d'ar c'houlz-se goloet a goadeier ; ar saverezh-chatal a voe, e-pad pell amzer c'hoazh, diazez armerzh ar vro.

Ne ouzer ket peseurt keltieg a oa komzet e Kembre un nebeut kantvedoù a-raok an oadvezh kristen, pe gouezeleg pe bredeleg. Darempredoù tost a oa etre Kembre hag Iwerzhon ha kredapl a-walc'h eo e voe ar gouezeleg yezh rannbarzhioù zo eus Kembre da vare an aloubadegoù, pa gouezhas an impalaeriezh roman en he foull (1).

(1) Diouzhtu un tu all ez eo bet goulakaet a-wechoù e oa bet ar predeneg yezh orin Iwerzhon hage vije ar gouezeleg deuet en implij pemdeziek adarre diwar al lovezon en doa miret evel yezh sakr end-eeun. Stumm henañ ar c'heltieg eo ar gouezeleg.

Diaes eo empennañ, eveljust, doareoù korfel ar boblañs a oa o vevañ e Kembre war-dro deroù an amzervezh kristen. Diwar lenn skrid Tacitus gouestlet gantañ d'e dad-kaer, Agricola, en devoa renet ar brezel a-enep d'ar pobladoù keltiek a oa o vevañ war diriegezh Kembre d'an ampoent, e c'heller goulakaat e oa da annezerion al ledenez pennañ tresoù ar c'heliou atlantel-kreizdouarek : ur vent etre pe vihan, ul liv kreñv, blev du, a-wechoù gloanek. Seurt stummoù-korf a gaver c'hoazh e Breizh koulz hag e Kembre.

## II. G R E Z   A R   R O M A N E D

Gouzout a reer en doa graet Kezar un argadadenn e Preden ur c'hantved a-raok ma voe bet dimesaet pobladoù keltiek Kembre, e tro ar bloavezhioù hanterkant K.H.S. Padal ne c'helle ket ar Romaned lezel Preden en he frankiz en abeg d'an darempredoù strizh a oa etre Preden ha Galia : kavell an drouizelezh e oa Preden ha keit ha ma vije manet dieub o dije kendalc'het Kelted ar c'hevandir da glask er vro-se rennerion speredel o dije broudet en o zouez spered ar rezid. Evit diogeliñ aloubidigezh C'halia e oa ret, eta, mestroniañ Preden. A-hed ar c'hentañkantved G.H.S. e klaskas ar Romaned seveniñ ar ratozh-se, o tapout douar e reter an Enezenn, da gentañ, hag oc'h astenn o c'hraban, tamm-ha-tamm, war-du an hanternoz hag ar c'hornog. Claudius, ur glevgadour roman, an hini eo a ziazezas ar gêr a zo bet anvet Caer Colun ("Colonia") e kembraeg ha Colchester e saozneg. Kendalc'het e voe e labourgant Ostorius ha Scapula a dagas, evit ar wech kentañ, poblad an "Ordovices" a oa staliet e gwalarn Preden. En hanternoz an Enezenn

ne voe ket ar Romaned evit mont en tu all da harzoù Kaledonia (Alba, war-bouez nebeut) ; ar rannbarzh-se a voe serret ha kaeet gant ur c'hleuz a voe graet anezhañ "moger Hadrius".

A nebeudoù e lakaas ar Romaned an arigrap war gornog Preden, da heul brezelekaadennoù renet gant Suetonius ha Julius Frontinus e 61 ; Agricola an hini eo, avat, a dizhas peurdrec'hiñ an "Ordovices" hag ar "Silures". Neuze eo e voe sujet Preden penn-da-benn d'ar galloud roman ha palforzhet, peurgent, neved an drouizelezh en Enez Von, en hanternoz Kembre. Ar pal-se, avat, ne voe ket diraezet hep poan, evel m'en diskouez danevell d Tacitus e-barzh e vuhezskrid "Agricola" rak brogarourion galonek a dalas ouzh an alouberion - evel ar rouanez Boudicca (" an hini drec'h") pe c'h Galgagos, levier an nerzh-lu predenat e Kembre ; hogen armet hag urzhiet gwelloc'h e oa al lu roman ha dre se ez eas ar maout gantañ.

Reter Preden a voe gounezet abred a-walc'h d'ar sevenadur ha d'ar stuziadur roman, en-dro da Lunden, peurgent. Er c'hornog, avat, ne voe gouest ar Romaned da ziazezañ nemet trevadurioù ha kampoù soudarded : "Venta", deuet da vezañ "Caerwent" e kembraeg, a oa kêrbenn Siluriz" a-hend-all ; "Deva" a reas Kembreiz anezhi "Caerlleon Fawr", da lavarout eo "Castra Legionum", "Kamp bras an armeoù" ; "Esca" - Caerlleon-ar-Wysg" (hevelep ster d'an anv) ; ar re-mañ a oa, eta, diazezadurioù pennañ ar Romaned e Kembre hogen re all a c'hellfed menegiñ, na petra : Caernarfon, Caer Rhun, Ffordun, Castell Collen, Aberyseir, Y Gelli Gaer, Caerdydd h.a.



Ur wech distrujet frammoù kevredigezhel an  
dizalc'hted e oa ar boblañs en em aozet buan ouzh ar  
mererezh roman. Moarvat e oa distank a-walc'h an  
dalc'herion ha, nemet e kêrioù bras zo eus reter  
an enezenn, n'o devoa ket an annezidi kalz darempred gant  
ar pennadurezhioù roman ; ar re-mañ, kennebeut, n'o  
deus ket esaeet ren ur politikerezh hebelebekaet  
reizhiadek er vro-se muioc'h eget er broioù dalc'het  
gant penn-da-benn d'an impalaeriezh ; pell e oa  
Roma diouzh Preden ha dre se e oa tennoc'h ivez  
kemer perzh da vat e buhez politikel ar stad roman  
(pezh a oa aesoc'h e kreisteiz hag e gevred Galia,  
lakaomp). Padal e ranker krediñ e prize Predeniz  
ar peoc'h hag an diogelroez roman rak buhezañ a  
rejont aloubadeg ar Saksoned hag an Angled en enezenn  
evel un drouziwezh (kement-se a oa ken gwir all e  
penn all an impalaeriezh roman ; kv. emzalc'h Sant-  
Aoustin dirak ar bandennadoù Germaned war ergerzh  
a zirolle war hanternoz Afrika er pempvet kantved).  
En o spered ivez e chome ar reizhveliezh roman ur  
gwarant a urzh-vat er gevredigezh. Perzhiek e oa  
Predeniz eta e lorc'h ar bed roman e-keñver ar  
"Varbared" (dedennus e vefe lenn skridoù Sidonius  
Apollinaris, ur Galian romanekaet, evit meizañ ervat  
tro-spered ar "Romaned" dirak diskar ar Stad roman).  
Ha moarvat e talc'has Kembreiz d'un arouezlun evel  
an "Aerouant ruz" - a oa hini al "legionoù" roman  
er vro-evit derc'hel en e sav gwengel ar veliezh  
roman he doa o gwarezet betek neuze diouzh gouezoni  
an alouberion nevez.

III. A R G R E N N A M Z E R U H E L

Tri-c'hant hanter-kant vloaz war-lerc'h bezañ erruet , er bloaz 400, e tilezas ar Romaned an Enezenn, o lezel Preden dizifenn ha digenurzh.

Azonet eo ar prantad 400-1000 gant ar merkoù dibar-mañ e Kembre koulz hag e Breizh pe e kornog Europa dre vras :

a) dizeriadur ar Stadelezh, anadet dreist-holl e ser steuziadur an impalaeriezh roman . Dezvad an hinienn n'eo ket mui termenet gant al lezenn mennet da vezañ hollvedel hogen gant e aparchantadur personel ouzh ur "c'henel", ur stroll diazezet war ar ouenn hag un orin boutin (kv. pennroll al lignez e Kembre pe ar "meuriad" ("klan") e-touez ar ouezeled). An Iliz hepken he deus miret , en ur stumm, perzhioù ar stadelezh hogen n'eo ket urzhiet neuze ken strizh ha ma vo diwezhatoc'h ; an ilizoù keltiek, n'eus forzh penaos, a zo hogos dishual d'ar mare-se, betek tost dibenn an VIIIvet kantved.

b) An digêriekadur. Mont a ra ar c'hêrioù bras hag etre da get er prantad-se ; an emdroadur-mañ a zo stag ouzh dizeriadur ar stadelezh hag ar "gevreish". C'hoarvezout a rae ur geoded galian-roman, da skouer, eus ur rouedad ensavioù kantreizhet gant ar Stad roman end-eeun. An holl ensavioù-se a ya da get war un dro gant an impalaeriezh roman.

k) Maz a da get al 'lezenn' ned a ket da get, evit keloù se, ar galloud e unan nemet ez eo hemañ 'lec'helet' hag enket war un domani strizh hag eñ dizave a-hend-all - nemet e-keñver an Iliz e ve ; houmañ, avat, ned eo nemet un aotrouniezh speredel hep beliezh lezennel eeun war ar gevredigezh.

d) Heloc'hted ar poblañsoù. Devoudet eo bet diskar an impalaeriezh roman, evit darn, gant an aloubadegoù, da lavarout eo, donedigezh poblañsoù ha n'oa ket an impalaeriezh roman evit ensammañ hag hevelebekaat. Amzeriañ a reer an aloubadegoù-se er Vvet kantved dreist-holl ; hogen keflusk ar poblañsoù a gendalc'ho, un tamm bennak atav, betek an deket kantved, gant ergerzhadegoù an"Normaned", lakaomp. Estreget ar C'hermaned pe ar Slaved o deus baleet bro e-kerzh ar c'hantvedoù-se avat : ar Vrezhoned koulz hag ar Ouezeled o deus fiñvet ivez. Aet eo ar Ouezeled d'en em staliañ e Kaledonia, da skouer, ha klasket o deus ober kemendall e Kembre ; ar Vrezhoned, diouzh o zu, o deus adpoblet Arvorig o tegouezhout a wagnadoù stank lerc'h-ouzh-lerc'h. Heuliañ a c'heller divroadegoù ar Vrezhoned gant beajoù, troiadoù, ergerzhadennoù ha merdeadennoù ar Sent keltiek, o vont eus ur vro d'eben, oc'h ambroug ar "c'henelioù" en o c'hantreadegoù.

Ar c'hwec'h kantved m'o deus gallet ar Gelted ha, peurgent, Kembreiz ha Brezhoned, mirout ar gwellañ o dishualded a zo bet kantvedoù a vruzhunadur hag a zistabilded politikel. Evel m'hon eus merket endev, ne oa nemet an Iliz a gement a vije bet gouest da c'hoari roll ar Stad hag ar gevreizh roman, ar vadeziant o reiñ un dezvad keodedel d'an den kristen. Hogen gouzañv a ra an Iliz hec'h unan diwar zistankadur ar c'hehenterezh hag an daremprederezh war diriegezh kozh an impalaeriezh ; dispennet eo bet rouedad an hentoù roman war-lerc'h steuziadur ar Stad roman ; heloc'h e oa a-hend-all ar poblañsoù (se hon eus merket dija uheloc'h).



Ar saviad-se an hini eo a ziskleir urzhiadur diforc'h an Iliz keltiek e Kembre koulz hag e Breizh er grennamzer uhel. Ar manatioù oc'h ambroug ar c'henelioù war vale eo a bourchas o frammoù kravezel da Vrezhoned Kembre hag Arvorig ; en eneb d'an eskopti a zo stag ouzh un diriegezh vererezhel resis, ne vern orin ar boblañs anezhi, e oa stag ar manati ouzh ur "c'henel" ha na vire ket atav an hevelep tiriegezh.

En abeg d'an diouer a ereadur strizh etre an Ilizoù keltiek ha sez Roma o deus bet ar re-se un doare emrenerezh pleustrek, eta, betek ar bloaz 768 ma teuas Elfodd, an eskob kembreat, a-benn da lakaat ar Gelted da zegemer deiziatadur roman gouel Fask.

A-bouez eo merkañ e voe kaset ar gefridi-se da benn gant un eskob. Distardadur al liammoù etre sez Roma hag an Ilizioù keltiek a zo aroueziet, dres, gant dreistpouez ar vanac'helezh er broioù keltiek er c'hantvedoù-se. Diwezhat a-walc'h e teuas an eskoptioù ha framm plaen an Iliz da c'hoari o roll mererezhel en urzhiadur an Iliz e Breizh.

#### A n d a r v o u d o ù

Tro hon eus roet d'hon displeg diwañ-benn saviad an Iliz e Kembre hag e Breizh o vezañ ma oa houmañ mell-gein ar gevredigezh en hor broioù er c'hantvedoù-se. Klask a raimp bremañ dezrevell pennañ darvoudoù marevezh ar grennamzer uhel e Kembre.

Unan anezho a zo bet arnod ar Ouezeled da anneziañ rannbarzhioù zo eus Kembre, en hanternoz : Mon, Arfon, Llyn ha Dyfed, testeniet gant enskrivadurioù e lizherenneg "Ogam", hag ivez er c'hreisteiz

e rannvro Mynyw.

A-douez Gouezeled Dyfed end-eeun e teue Sant-Dewi, sant paeron Kembre. Dre vras ne oa nemet ur gristeniezh keltiek bleniet ha stummet gant an hevelep sent alies, darn anezho o vonedone eus ur vro d'eben, etre Breizh vihan ha Kembre, da skouer. E-mesk ar re a zo bet pouezus o roll e deroù istor Kembre e c'heller menegiñ Sant Padarn, Sant Gweltaz, Sant Teilo, Sant Cadog, Sant Deiniol h.a.

Ma tleer komz eus "annezadeg" ar Gouezeled e Kembre - dave a reer d'an annezadeg-se e darn eus danevelloù ar 'Mabinogion' - a voe peoc'hus a-walc'h hag a echuas gant hevelebekadur ar Gouezeled<sup>/gant</sup> ar "Vrezhoned" e ranker, eveljust, ober eus donedigezh ar Saksoned hag an Angled e Preden un aloubadeg; houmañ, dres, a voe aroueziet gant banvez-lazhadeg Hengist (un darvoud hanter mojennel hogen a ziskouez mat peseurt darempredoù a oa er penn-kentañ etre ar "Varbared" ouez hag ar Vrezhoned sevenaet gant ar Romaned.) E-pad kantvedoù e nac'has Brezhoned ha Kembreiz, peurgent, skoulmañ darempred gant an alouberion, zoken - ha dreist-holl marteze - evit avielañ anezho. Etre 450 ha 600 e kendalc'has ar stourm a-enep d'ar 'Saozon', eta, hogen ar re-mañ a luskas Kembreiz war-dreñv muioc'h-mui ken en em gavas rannet kenelioù gwalarn Preden - 'Cumberland' - diouzh re ar c'hornog - Kembreiz - pe ar mervent - Kerneveuriz -. Padal, Predeniz ar Gwalarn a zalc'has d'o yezh diwezhat a-walc'h betek an VIIIvet pe an navet kantved.

Hogen n'eo ket hepken ouzh ar Saozon o devoe Kembreiz da dalañ, - ouzh Daniz ha "Norzhmaniz", ne

lavaran ket, dreist-holl er seizhvet hag en eizhvet kantved. Evit herzel ouzh an alouberion o tont eus ar reter e savas Kembreiz er bloaz 796 "Kleuz Offa" a oa mennet da argas ar bandennadoù forbanned a zeue da wastañ o bro diouzh diabarzh Preden. Hogen ne c'hellent ket mirout ouzh "Norzhmaniz" a zouarañ war an aodoù da zrastañ ar maezioù tro-war-dro, o tistr-ujañ, peurgent, ar manatioù. E ken bras argoll edo Kembreiz neuze ma klaskjont, a-benn ar fin, en em glevout gant ar Saozon evit herzel ouzh ur walenn hag a skoe ken gwazh o amezeion hag int. Unan eus tevezzeion Gembre neuze, Rhodri Fawr, marv e 878 hag Anawrd, e vab, a gejas gant Alffri, roue ar Wessex hag a skoulmas un emglev gantañ. D'ar mare-se e kavas Kembre un tamm kempouez dindan ren Hywel Dda ('Howel Da, Howel mat') a voe priñs Kembre a-bezh hag a varvas e 950. Brudet e voe evit ar reizhiad lezennoù a embannas e-kerzh e ren ; an tevezeg-mañ a gendalc'has gant politikerezh Rhodri Fawr, o terc'hel d'an darempredoù mat o devoa diazezet e rakkerzherion gant lez roue Wessex ; klask a reas ivez reiñ un dezvad etrevroadel da Gembre o vont da Roma, e sez ar Babelezh, e 928.

#### IV. E I L P R A N T A D A R G R E N N A M Z E R

1000 - 1450

Er grez-se e c'hoarvezas an taerañ strivadoù da ober eus Kembre ur vroad dishual kenframmet en ur stad ; c'hwitañ a reas an arnod-se, evel ma welimp. Hogen a-rack displegañ an darvoudoù a verk dibunadur istor ar grennamzer izel e Kembre e klaskimp diskleriañ, a-gent, perak e c'hwitas an arnod-se.



An abeg pennañ a voe diazezidigezh ur stad unvan gant an Normaned-c'hall e Bro-Saoz. Betek neuze o doa bet afer Kembreiz ouzh rouantelezhioù ar "Saozon", distag an eil diouzh eben, ha dister a-walc'h a-hend-all, pe ouzh bandennadoù preizherion ha morlaeron o kantren bepred, hep douar na danvez na politikerezh ha dic'houest a-grenn da grouiñ ur stad. An dra-se, avat, a dizhas ober an "Normaned". Hag int Gallaoued a yezh, e darempred stank gant ar C'hallaoued eus ar c'hevandir a oa kenyezh ganto, e harpjont o rouaned e-pad "brezel kant vloaz" - a voe un doare brezel hêrezh diabarzh er penn-kentañ - da bakañ krog e kurunenn Vro-C'hall ; arabat e vefe disoñjal e voe sikouret ar "Saozon" e Bro-C'hall gant e-leizh a frammoù hag a c'houvriaded ha na welent ket, end anat, e mistri ar mare gwir e strenion na 'barbared'. Bezet pe vezet, dre o orin koulz ha dre an emell a gemerjont en aferioù ar Stad c'hall - a oa diorreet a-walc'h adal ar c'houlz-se - e teskas an "Normaned" skiant ar stad evit o c'hont o unan ; hor bezet koun e oa ar vaodierned c'hall oc'h adskoulmañ gant hengoun ar Stad roman adal amzer "Philippe Le Bel", lakaomp. Kembreiz, avat, er c'heit-se, a chome e par ar meuriadoù hag ar "c'henelioù" a liamme an hiniannoù dre zarempredoù personel ar ouenn hag ar gwad.

E-kerzh ar c'hantvedoù-se ivez ez eus kresket e Bro-Saoz renkadoù politikelaet a venne kemer perzh war-eeun e melestradur ar Stad. En eil prantad ar grennamzer e Bro-Saoz e tiwan egin ur vourc'hiziezh kenwerzhel hag ur vuhez kêrel, gant ar vuhez dinazel a zo stag outi. Diazezadur ur gêrbenn a voe eno - evel e Bro-C'hall - ur

gammed a-bouez war-du kadarnadur ar galloud politikel. Amañ adarre avat, netra heñvel e Kembre. Eno ne oa anadet renkad etre ebet; kenwerzh ebet ; ne gaved er gevredigezh kembreat nemet brientinion vrezelgar diouzh un tu ha plouezidi ha na gemerent deur ebet er politikerzh, na petra, diouzh an tu all. Kement-se a ziskleir, evit darn, perak ne voe tu biskoazh da grouiñ ur stad unvan e Kembre.

Moarvat ez eus bet abegoù all, naturel, koulz lavaret. Edo Kembre gennet etre Bro-Saoz - a oa trec'h dezhi adal deroù ar Stad norman-saoz hag a selle outi evel ur rannbarzh eus he ziriegezh natur - hag ur vro all a oa ken dizunvan ha ken tavantek hag hi ha na c'helle, a-hend-all, degas skoazell ebet dezhi, elese, Iwerzhon; en ur mor serret edo enket Kembre ; disheñvel eo he saviad diouzh hini Breizh durc'het ouzh ur mor digor hag a roe tu dezhi kenwerzhañ gant aodoù kornog Europa, adal Spagn betek Flandrez.

Tolzennek ha meneziek eo ivez douar Kembre, start tre kehentañ drezañ etre hanternoz ha kreisteiz (hiziv zoken n'eo ket aes mont eus an eil rannbarzh d'egile). Diouzh un tu all, n'eo ket ken hir na ken degemerus hec'h aodoù ha re Vreizh maz eo fonnus enno an aberioù hag ar porzhioù. N'eus ket da souezhiñ eta ma vanas rannet Kembre, betek an diwezh, etre rannvroioù ha na dizhjont biskoazh en em unaniñ.

N'oa ket ingal tamm ebet ar stourm etre Bro-Saoz norman unvanet abred ha Kembre diempret. E gwir e taolas an "Normaned" o zroad abred tre el ledenez, evel ma rejont en Iwerzhon. Moarvat ne voe ket gouest rouaned Vro-Saoz da stagañ ar vro-mañ diouzhtu ouzh o c'hurunenn

hogen adal an XIIIvet kantved o devoa staliet e kreisteiz hag en hanternoz Kembre gwarnizonoù a oa karget da evezhiañ ha da reoliñ poblañs Kembre. Abred tre eta en deus tapet krog an estren e Kembre, o terc'hel ar vro gant e gestell hag e vilourion, hag o tuta zoken - evel ma ra pep trevadennour - soudarded evit e lu-eñ (gwaregourion a gemeras perzh, da skouer, en emgann Crécy e-kerzh ar "brezel kant vloaz"). Ma ne voe ket peurlonket Kembre gant Bro-Saoz d'ar mare-se e voe kiriek da se enkadenn pe enkadenn o reuziañ ar Stad saoz hec'h unan. Se a welimp diwezhatoc'h end-eeun. Pezh a fell deomp merkañ bremañ eo e oa gwashoc'h e keñverioù zo emgav politikel Kembre eget hini Breizh en hevelep kantvedoù.

E keñverioù all zo e oa gwelloc'h. Daoust dezhi bezañ rannet ez eo chomet Kembre ur vroad unyezh a-hed ar grennamzer ha betek an amzer vremañ, koulz lavaret. An dra-se a c'heller diskleriañ e meur a zoare. En eneb da Vrezhoned Vreizh-Vihan n'o deus ket Kembreiz aloubet ranndirioù arallyezh en tu all da "gleuz Offa", da skouer. N'o deus ket **bet** he brientinon tro da goll o yezh vroadel e-barzh lu Gwilherm an Alouber pe o pleustriñ noblañsoù galleger evel m'o deus graet re Vreizh adal ar bloavezh 1.000. Er c'hontrol o deus brientinon Gembre, difennet marteze gant o menezioù, dalc'het d'o yezh ; kreñv e oa en o zouez ar spered kenelel ; bod ha boued a roent en o lez d'ar varzhed kembraek. Dre se o deus miret ar spered broadel e Kembre tra ma leze re Vreizh ar spered **kel-tiek** da zizeriañ en hor bro.



Ar manatioù o deus c'hoariet o roll **kerkoulz** e Kembre. Int ivez o deus gwarezet hag harpet ar varzhed, evel ma rae ar vrientinion. Moarvat n'o devoa ket manatioù Kembre reuziet kement ouzh aloubadegoù ha preizhadegoù Norzhmaniz ha m'o devoa graet manatioù <sup>ivez</sup> Breizh. Bezet pe vezet, a drugarez dezho ez eo padet ha bleuniet an hengoun lennegel kembraek, un hengoun ha na voe torret gwech ebet peogwir ez a ar gwrizioù anezhañ betek deroù ar vroad kembreat : Taliesin hag Aneurin o devoa savet o oberenn a-raok an deket kantved ; war o lerc'h, etre 1.000 ha 1.300, e teuas ar "Gogynfeirdd" - barzhed a lez - ha konterion ar "Mabinogion" (er manatioù end-eeun e vo eilskrivet ha miret oberennoù ar skrivagnerion-mañ). Er XVvet kantved e paras ampartañ barzh ar c'hantved-se ha, marteze, ampartañ hini lennegezh Kembre en he fezh : Dafydd Ap Gwilym.

Klask a raimp bremañ, adarre, dezrevell pouezusañ darvoudoù istor Kembre e-kerzh ar pevar c'hantved hanter-mañ.

E deroù an deket kantved eta e oa bastus a-walc'h stad politikel Gembre. Unan eus tevezioù Gembre en unnekvet kantved en devoa, zoken, aloubet douaroù en tu-hont da "Gleuz Offa" hogen trec'het e oa bet a-benn ar fin gant ar roue saoz, Harold, e 1.063, tri bloaz kent na dapje Gwilherm an Alouber douar en enezenn(1). Deuet e oa hemañ a-benn da sujañ ar rouantelezhioù saoz d'e veli hogen n'en doa ket tizhet ober kemendall e Kembre. Padal en devoa lec'hiet mestr nevez Bro-Saoz pennoù-lu enleet . outañ war harzoù kreisteiz Kembre, emren, moarvat, hogen feal dezhañ, e Caerlleon Fawr,  
(1) Gruffydd ap Llewellyn a oa anv an alouber-se.

en Amwythig hag en Henffordd a oa deuet da vezañ un doare trevadennoù soudardel saoz war zouar Kembre. En hanternoz, avat, ne oa ket bet tu da gemer seurt diarbennoù diouzhtu ; kreñv e chomas ar galloud kembreat eno, gant tevezeion a oa o anv Robert O Ruddlan, marv e 1088, hag Huw, e vab, a faezhas Lec'hleenniz - annezet e Dulenn - e 1098. Un nebeut dekvedoù goude, e 1137, e c'helle unan krediñ e vije deuet Gwynedd - rannvro an hanternoz - da vezañ egin ur Stad.

Rannvro ar c'hreiz, Powys, a oa dieub ivez e deroù an daouzekvet kantved hag a reas berzh dindan lignez Bleddyn. Er c'hreisteiz hepken e c'hellas ar rouaned norman damesa Kembreiz, e deroù an daouzekvet kantved, ur wech ma voe marv Rhys ap Tewdwr, diskennad Hywel Dda, bet tapet ar galloud gantañ er rannvro-se en emgann Mynydd Carn e 1092. Roue norman-gall Bro-Saoz a stalias neuze e zerc'houezerion da reoliñ a rannbarzhioù-se en e anv, hep o stagañ evit keloù se ouzh e rouantelezh war-eeun : Robert Fitzhamon e Morgannwg, Bernard de Neufmarché e Dyfed ha Ceredigion, ha Montgomery e Brycheiniog.

War-lerc'h marv Herri ar C'hentañ ez eas an traoù war wellaat e Kembre. Mibion Gruffydd ap Cynan, Owain ha Cadwaladr, a zeuas da vezañ mistri er c'hreisteiz tra ma astenne Gwynedd, en hanternoz, e harzoù betek ar Wyddgrug a voe aloubet e 1176 gant Owain.

E kreiz Kembre e voe unanet rannvro bPowys gant ar priñs Madog ap Meredudd e 1160 ; hemañ an hini eo a savas ivez kastell Crossowallt.

Pa zeuas Herri an eil war an tron e Bro-Saoz e voe kemmet, adarre, penn d'ar vazh. Hemañ a roas lamm,

a bep eil, da Owain Gwynedd en hanternoz e 1157 ha Rhys ap Gruffydd er c'hreisteiz e 1163 hogen p'en em savas Kembreiz adarre e 1165 e c'hwitas gant e soñj d'o feurdrec'hiñ rak sammet e voe e Lunden gant gwall-afar Thomas Becket hag e ganstok ouzh an Iliz.Kembreiz, avat, ne c'helljont ket tennañ kalz mad eus an dro-vat-mañ rak mervel a reas o rener pennañ, Owain Gwynedd, e 1170.

Evit klozañ istor Kembre en daouzekvet kantved ez eo ret menegiñ kudenn an darempredoù etre an Iliz ha Kembre. Gwelet hon eus he doa miret an Iliz keltiek e Kembre un doare emrenerezh betek ar bloavezh 768 ; diazezet e oa an Iliz er broioù keltiek, ivez, war ar vanac'helezh - oc'h emplegañ kenvuhez, kenglad hag he-loc'hted war un dro - kentoc'h eget war framm roman hengounel an eskoptioù hag ar parrezioù. Pa voe stabilaet keflusk ar boblañs e klaskas renerion ar broioù keltiek tapout digant sez Roma ur frammadur ilizel a-ziforc'h o klotañ gant o broadoù. E Breizh, da skouer, ez arnodas Nevenoe ober eus arc'heskob Dol priveskob ar vro. Hogen a-c'houdevezh ha daoust d'e strivoù e voe staget Breizh ouzh kembeli priveskob Teurgn e Bro-C'hall. E Kembre e voe skoilhet renerion ar vroad gant an hevelep kudenn rak eskibion Gembre a ranke plegañ da zreibeli Caergraint e Bro-Saoz. Gerallt, den a iliz, hanter Norman, hanter Kembre dre e orin, brogarour kembreat avat, a felle dezhañ ivez terriñ an hualoù a gabestre iliz Kembre hogen ne c'hellas ket kas da wir e vennad.(1). Diwezhatoc'h e fello da Owain :

(1) Gerallt a zo aozer un deskrivadur eus Kembre en e amzer, bet skridaet e latin, hag a zo talvoudus bras d'an istorour. Pennadoù zo eus e levr a zo bet troet e brezhoneg, a gav din.



Glyndwr, d'e dro, dishualded an Iliz kembreat e-keñver an iliz saoz ha sez Roma betek ur poent zo; hogen re verr amzer e vanas mestr e Kembre evit kas ar ratozh-se da vat ivez.

V. A n t r i z e k v e t k a n t v e d e K e m b r e

En trizekvet kantved e c'hoarvezas an arnodou feulsañ da grouiñ, a-benn ar fin, ur stad kembreat unvan ha digabestr, ma lakaer a-ziforc'h hini Owain Glyndwr e dibenn ar XIVvet kantved hag e deroù ar XVvet.

Llywellyn ab Iorwerth, hêr Owain Gwynedd, levier rannvro an hanternoz, "tevezeg" Aberffraw hag "arluz" Eryri, a zistroadas e gevezer eus Powys, ar rannvro greiz, Gwenwynwr e anv, - mervel a reas hemañ e 1216 - a skoulmas un emglev gant e warlerc'hiad, Madog, hag a reas e vad eus gwanded roue Bro-Saoz, Herri an Trede, evit aloubiñ rannbarzhioù ar c'hreisteiz ha lemel digant diskennidi Rhys o fennaotrouniezh warno (ne vern penaos en em gave ar c'hreisteiz dindan reolerezh vilourel ar Saozon). A-benn ar fin e teuas Llywellyn ap Iorwerth war zouaroù Powys, o stourm en dro-mañ a-enep d'e dad-kaer. Hogen pa varvas ar priñs kembreat Llywellyn Fawr e 1240, en abati Aberconwy, en hanternoz n'en doa ket gellet, evelkent, diazezañ ur Stad unvan. Nac'hañ a reas ar Saozon anzav gwirioù e vab Dafydd war greisteiz ar vro ha pa varvas hemañ e 1246 e voe rannet Kembre adarre. Dav eo lavarout e oa ar briñsed kembreat alies re stag ouzh o rannvro ha n'o devoa ket a-walc'h skiant kenvad Kembre a-bezh. Se a voe anat p'en em gannas kenetrezo mibion vihan

Llywellyn Fawr evit skrapañ pep hini evitañ e unan ul lodenn eus hêrezh o zad-kozh. En emstrivadeg-se avat ez eas ar maout gant Llywellyn ap Gruffydd, en emgann Bryn Derwyn, e 1255.

Ar priñs-mañ a reas e seizh gwellañ evit seveniñ mennadoù e dad-kozh hag a dennas e vad a nevez eus diaesterioù roue Bro-Saoz en devoa bec'h d'ar mare-se gant e varoned a-benn kemer da ditl e gurunenn "Tywysog Cymru", da lavarout eo "Tevezeg - 'priñs' - Kembre". Dindan an titl-se e voe anzavet e veli gant Simon de Montfort hag Herri an Trede e unan, roue Bro-Saoz, a sinas gant levier Kembre ur feur-emglev, e Trefaldwyn ; dre an teul-se e tarbenne ar roue, eta, goulennadoù Llywellyn ap Gruffydd hogen arluzed saoz kreisteiz Kembre ne voent ket ken prest all da blegañ da veli an "Tywysog" ; unan anezho, zoken, kont Caerloyw, a savas kastell Caerffili, e-tal Caerdydd, evit dizarbenn, diouzh ret, argadoù Priñs Kembre.

Siwazh, ne reas ket ar politikerezh unvaniñ-se berzh pell amzer. Adal m'en devoe Edouarzh ar C'hentañ adempret ar Stad saoz e fellas dezhañ diogelaat keindir e rouantelezh war-du ar c'hornog. Brezel a reas eta da Gembreiz e 1277. O vezañ ma oa start treuziñ menezioù koadek Kembre e tilestras e lu war an aodoù ha faezhañ a reas Llywellyn ap Gruffydd. Da hemañ e voe aotreet evelkent mirout e ditl hogen dimeziñ a rankas gant merc'h Simon de Montfort. E 1282, avat, war wall berrboellegezh breur Llywellyn ap Gruffydd, Dafydd e anv, e tarzhas ar brezel en-dro. Ar wech-se e tivourzhas ar Saozon en Enez Von, edusañ rannvro Gembre en hanternoz, ken e oa lezanvet "Grignol

Gembre" ha drailhañ a rejont lu Kembreiz : tec'hout a rankas Llywellyn ap Gruffydd. A-greiz tec'hout e voe lazhet dre zegouezh e Llanfair-ym-Muallt d'an ll a viz Kerzu 1282 ; Dafydd, e vreur, a voe paket ha lazhet ur bloaz war-lerc'h e 1283.

Ne voe ket ken kriz tonkadur ar briñsed kembreat all, Gwenwynwyn, da skouer, a voe lezet didrabas peogwir en devoa harpet Edouarzh ar c'hentañ ha kenlabouret gantañ ; kemendall ivez evit Rhys ap Meredith, en Ystrad Tywi. Pezh a felle da roue Bro-Saoz avat e oa reoliñ war-eeun tri rannbarzh-alc'hwez eus Kembre a-benn rañjennañ ar vro en he fezh. Embann a reas roue Bro-Saoz eta "Ystatud Rhuddlan" e 1284. Dre ar "Statud"-se e voe lakaet kontelezhioù Mon, Caernarfon ha Meirionydd dindan reolerezh ha beli "Ustus Eryri" ; e kontelezh ar Fflint hag en hanternoz dre vras e voe taolet ur rouedad kestall a oa mennet da zizarbenn darsavioù Kembreiz : Miwmares, Caernarfon, Conwy, Cricieth, Harlech.

Er c'hreisteiz e voe a-walc'h da Edouarzh ar C'hentañ adurzhiañ kontelezhioù Aberteifi ha Caerfyrddin. Ne voe kemmet netra avat e dezvad ar c'hontelezhioù arall nemet e voe krouet re nevez war an harzoù ha lakaet Saozon-Normaned er penn anezho ; ar re-mañ a voe graet anezho "Arglwyddi'r Mers" ("Arluzed ar Marz"). An holl "arluzed"-se, avat, ne oant ket sujet war-eeun d'ar galloud saoz ; dre anv e oant digabestr, o kevezañ hag o vrezeliñ kenetrezo a-wechoù. E 1290, da skouer, e rankas Edouarzh ar C'hentañ, mont da hanterour etrezo ha



kompezañ o rendaelioù. Ar pezh a sammas roue Bro-Saoz war ar vro eta e voe un doare feur-emglev "Westfalia" a vruzhune hag a zic'halloude Kembre.

VI. Ar pev ar zekvet kantved e Kembre

Mab henañ Edouarzh ar C'hentañ, Edouarzh an Eil, a voe ganet e Caernarfon e deroù ar XIVvet kantved. Holl leve douaroù ar gurunenn saoz e Kembre a voe deroet dezhañ, ha debarzhet, ouzhpenn, an titl a "bPriñs Kembre". Kement-se a oa ur gammed ouzhpenn evit peurlakaat an arigrap war Gembre.

E deroù ren Edouarzh an Eil ne voe trubuilh ebet e Kembre. Padal ez eas war-raok an argersh enframmañ ar vro er reizhiad politikel saoz hop arsav ebet. Roomp ur skouer. Pa savas un tabut e 1309 e ser Powys Wenwynwyn e voe diskoulmet hervez lezennoù Bro-Saoz ha n'eo ket hervez lezennoù Hywel Dda. Ur Saoz eo a zimezas ivez gant pennhêrez ar priñs diwezhañ er rannvro-se; houmañ, a-hend-all, ne voe mui anvet "Priñselezh Powys" hogen "Arluziezh Powys er Marz".

Dinerzh a-walc'h e oa galloud Edouarzh an Eil hag hiniennoù zo e Kembre a soñjas e ve da tennañ mad eus an degouezh-se evit hejañ kuit yev ar Saozon. Tarzhañ a reas un emsavadeg e 1316 e Morgannwg, renet gant Llywellyn Bren. Mouget e voe an emsavadeg-se. Da heul e voe dasparzhet douaroù eus Kembre etre arluzed saoz ; Lancaster, Dispenser, Mortimer a biauas tachennoù e Kembre. Ar gourzalc'hadur-se eus domanioù e Kembre gant Saozon en devoe un heuliad pouezus : diouzh kevreizh ar c'hladdalc'helezh e voe sachet

poblañs an domaniou-se e-barzh tabutoù diabarzh ar riez saoz a-c'houdevezh.

Dindan Edouarzh an Trede e vleunias ar peoc'h adarre e Kembre. Adsavet e voe "Priñselezh Kembre" ha lakaet ar renerezh anezhi etre daouarn ar ar "Priñs Du" e 1343. Nemañ a ouarnas sioul ar vro e-pad tri-ugent vloaz bennak, betek ar mare m'en em savas Owain Glyndwr e dibenn ar c'hantved.

Un nebeut evezhiadennoù a c'hellimp ober bremañ a-zivout dalc'hidigezh ar vro gant ar Saozon er XIVvet kantved. Arabat e vefe krediñ o devoe an darvoudoù a neuze ul levezon vras war doare-bevañ ha stuzegezh Kembreiz na, kennebeut all, war o buhez kefredel hag o sevenadur. Dister tre e oa niver an estrenion a zalc'he ar vro gant o c'hestell - o meneget hon eus endev - hag o "bwrdeisdrefi".

Petra e oa eta ar "bwrdeisdrefi" emañ o paouez ober meneg anezho ? Bez e oa eus ar re-mañ eta trevadennadurioù saoz, bourc'hadennoù nevidañ, marc'hadoù, mar karit, a bourchase o ezhommoù d'ar gwarnizonoù saoz strewet dre ar vro, oc'h enporzhiañ kenderc'hadoù a bep seurt : holen, houarn, ploum h.a., a-wechoù kenderc'hadoù tramor : pebr, gwin Gwaskogn h.a. Er "bwrdeisdrefi"-se, avat, ne oa Kembread ebet. Kembreiz, eta, en em gave e saviad ur bobl a raezidi o vevañ dindan ur renad a zalc'hidigezh vilourel harpet gant un nebeut bourc'hizion estren.

A-hend-all e kendalc'he al lignezoù kozh a uhelidi hag a noblañsoù ("uchelwyr" ha "gwyrdä")



dezho pinvidigezh ha goar, da brizout al lennegezh hag an arzoù-kaer. Hervez ur "stent" eus 1352 (1) n'en doa ket ar renkad-se kollet kalz tra a ziwar dalc'hidigezh ar vro gant ar Saozon (ha rak-se, ivez, moarvat, ne oa ket techet tre d'en em sevel a-enep d'ar galloud saoz); bez o devoa gant ar "Priñs Du" an hevelep darempredoù ha gant ar brifised kembreat a Wynedd a ziagent. Hemañ e oa, peurgent, degouezh uhelidi Penmynydd ha Trecastell en Enez Fon, hini ivez Ednyfed Fychan, kentañ maodiern Llywellyn Fawr, a voe gourdad an Dudured, hag e ziskennidi (gouenn ar re-mañ a badas betek an XIXvet kantved).

Kalz a bled a daole Kembreiz ouzh o lignez, se a ouzomp dija; brudet e oant evit o lorc'h 'tilu', evel m'en diskouez o giz d'en em envel dre ar rakger "ap" ("mab", "ab..." e brezhoneg) pe hini ar meul-ganoù lignez a ya d'ober ar pep pennañ eus al lennegezh kembraek er grennamzer.

Ne zeuas fallaenn ebet el lennegezh-se da heul an aloubidigezh gant ar Saozon o vezañ m'o devoa an uhelidi gembreat miret o brientoù hag, ivez, o lez a roe bod d'ar "varzhed" ; bepred e oant gwarezourion al lennegourion, evel m'hon eus merket a-ziaraog. Nemet, evelkent, e teuas kemm e danvez hag e doare ar varzhoniezh ; Dafydd ap Gwilym, a zo sellet gant meur a hini <sup>evel</sup> pennañ barzh ar XIVvet kantved, eta, a ijinis ur gwerzaouerezh nevez, ar "mesur cywydd" hag a veras testennoù nevez : ar garantez evit ar merc'hed ha bourrusted an Natur a voe kanet gantañ ha dilezet, en eneb, brezel hag harozerezh (un arouez e oa kement-se avat eus saviad  
(1) Danevellskrid.



politikel nevez Kembreiz a oa risklet kuit diwar leurenn an istor da heul ar faezhidigezh).

Oadvezh aour al lennegezh kembraek ez eo bet an trizekvet hag ar pevarzekvet kantved, pa voe savet, dreist-holl, ar "Mabinogion", ar "Brudoù" ("Danevelloù") hag ar romantoù diwar-benn Arzhur. Dre se e weler ne voe ket skoilhet al lennegezh kembraek gant ar brezelioù a reas o reuz er vro er grez-se ; a zo gwelloc'h, glan tre a yezh ez eo al lennegezh-se, evel ma c'heller gortoz di-gant ur vroad **unyez** (hemañ n'oa ket degouezh Breizh d'an ampoent) hag, ivez, a-berzh ur vroad en em ganne taer evit diogeliñ he frankiz a-enep d'an estren.

Arabat e vefe, kerkoulz all, faltaziañ e vane Kembreiz serret en o bro en amzer drubuilhet -hont. Kalz anezho a yae da studiañ e Roma, Santiago, Rydychen ha Caergrawnt. Ouzhpennomp e oa deuet a-benn ar Saozon da zedennañ darn anezho en o armeoù; gwaregourion gembreat en em gannas en emgann Crécy, da skouer, gant ar "Priñs Du" - a oa "Priñs Kembre" - hag en sikouras da c'hounit an trec'h en devezh-se. Evit bezañ reizh, avat, e ranker resizañ n'en em gave ket Kembreiz e kostezenn ar Saozon <sup>hepken/</sup> e-pad ar "brezel kant vloaz" (en holl vroioù trec'het e kenlabour darn eus broiz gant an enebour) ; Owain Llawgoch ("Owen Dorn-Ruz"), hêr "Llywellyn y Llyw Olaf" ("Llywellyn al levier diwezhañ ") a skoazellas ar C'hallaoued en o stourm a-enep d'ar Saozon hag eñ oc'h arc'hañ evitañ e unan an titl a "bPriñs Kembre". E 1370 ez aozas ur c'herzh-argadiñ e Kembre ; ne reas ket berzh, avat, ha muntret e voe en hevelep bloavezh gant ur goprlazher eus roue Bro-Saoz.

VII. Owain Glyndwr hag ar brezel  
dieubiñ c'hwitet

E 1400 e tarzhas ar brezel e Kembre.

Arluz Glydyfrdwy ha dileuriad priñsed Powys Fadog e oa Owain Glyndwr. Pa voe dispennet ar briñselezh-se e voe sellet evel arluz daou daolead, Tanad ha Dyfrdwy, en arluziezhoù ar Marz, war harzoù Kembre. A-berzh e vamm e tiskenne a unan eus lignezoù ar c'hreisteiz.

Enleet e oa ouzh roue Bro-Saoz, Richard an Eil, hag en em gannañ a reas gantañ en e arme e-pad ur pennad amzer. War a hañval, a-hend-all, ne voe ket trubuilhet gant donedigezh Herri ar Pevare war an tron, e Bro-Saoz, e 1399. Ne ouzer ket re vat, eta, diwar be arbenn e tastumas Owain Glyndwr ul lu e miz Gwengolo 1400 da dagañ kreñvlec'hioù ar Saozon er vro ; marteze a-walc'h dre ma oa savet ar gouarnamant saoz a-du gant e amezeg, Grey, en tabut en enebe ouzh hemañ ; pe un abeg all a oa, diaes eo gouzout. Kredapl eo evelkent en devoa huñvreet Owain Glyndwr meur a wech diwarbenn adsavidigezh ur Gembre dishual ; anez, n'en dije ket kaset ken prim da bennvat ar brezel a renas neuze a-enep d'ar Saozon.

En deroù ez eas an tu-kreñv gant Owain Glyndwr dre ma ne oa ket Herri IV asur tre war e dron. Owain Glyndwr a c'houlennas skoazell digant Skosiz, Iwerzhoniz ha Gallaoued ; Charles VI a Vro-C'hall, a gasas dezhañ 3.000 den armet e 1405. Talvoudusoc'h c'hoazh e voe dezhañ an harp a dapas digant gladdalc'hidi zrouklaouen Herri IV ; evel-se

en em glevas gant Hotspur, arc'heskob Skrope, kont Northumberland.

Kadoniour ampart e voe Owain Glyndwr ivez. Didec'hout a-reas d'ar menezioù, o nac'hañ en em gannañ gant lucez trec'h d'e hini ; pakañ a reas krog en e arc'h-enebour, Grey, ha ne zicubas anezhañ nemet war-bouez ur werzh-daspren uhel da baeañ gant e vignon Herri IV.

En hevelep doare en devoa prizoniet Edmwnd Mortimer, niz ar roue. Hemañ, avat, en devoa erez ouzh e eontr a nac'he anzav e wirioù war ar gurunenn saoz. Akuit a-walc'h e voe Owain Glyndwr evit gounit fiziañs an den-se hag e lakaat d'en em gannañ evitañ a-enep roue Bro-Saoz, e eontr.

A-barzh pell e voe Owain Glyndwr gwir vestr Kembre. Diwar argad ez aloubas kastell Harlech. Bodañ a reas Breudoù ar vro er chastell-se end-eeun hag e Machynlleth ; envel a reas eskibion ; embann a a reas lezennoù dindan e siell-veur, evel ur roue ; erfin e sinas ur feur-emglev gant Bro-C'hall hag e kasas ul laz-kannaded da Avignon, e spi da obten digant ar Pab kadarnadur e reizhveli. Dre ar "Cytundeb Tridarn" kinniget gantañ evit echuiñ ar brezel e c'houlenne stagañ ouzh Kembre rannbarzhioù zo en tu all da "Gleuz Offa". War un dro ez empenne ur raktres da zishualañ an Iliz e Kembre, dre arc'hañ e teufe Tyddewi da vezañ arc'heskopti e Kembre, e ve dispignet e Kembre an holl zeogoù a vije dastumet e Kembre a-berzh an Iliz, hag e ve Kembreiz a orin eus kement den a Iliz a vije anvet en e garg e Kembre. En hevelep amzer e felle dezhañ diazezañ



div Skol-Veur e er vro, unan en hanternoz hag unan er c'hreisteiz.

Siwazh, ne voe tu ebet da seveniñ an holl raktresoù-se. Kentizh ha ma voe Herri IV startaet war e dron e troas e holl nerzh a-enep da Owain Glyndwr ; da hemañ, er c'hontrol, e reas diouer ar sikour a c'hortoze digant an estrenvro ; nag e Caer Wrangon nag e Worcester n'en devoe ar skoazell a oa bet prometet gant ar C'hallaoued ; dister tre e voe harp ar re-se epad eil prantad ar brezel broadel renet gant Owain Glyndwr. Hag eñ manet e unan penn ne c'hellas ket hemañ mirout ouzh ar Saizon a gemer Aberystwyth ha, diouzhtu goude, a bakañ krog en Harlech, e 1408. Diwar neuze e oa kouezhet en he foull an danvez Stad Vroadel en devoa Owain Glyndwr huñvreet enni. E-pad eizh vloaz, koulskoude, e kendalc'has d'en em gannañ, hep goanag ebet avat, ha pa varvas e 1416 ne voe rener nevez ebet d'e amsaviñ ken e paouezas an emsavadeg d'ar mare-se.

Daoust ha tec'hout a c'helled diouzh hevelep drouziwezh ? N'eo ket sur. Diaes e oa d'ur vroad vihan evel Kembre, enni hepken plouezidi ha "bonez" (1), derc'hel penn, en un doare efedus, ouzh ur riez a oa pinvidikoc'h hag urzhiet gwelloc'h egeti abaoe pell, petra bennak ma ne oa ket stabilaet da vat ar Stad-se. A-hend-all, e-giz ma ouzer, dalc'het e oa ar vro gant soudarded estren. Goulakaat a c'heller e vije bet furoc'h da Owain Glyndwr lakaat da badout ur gouvrezel hir en dije rivinet tamm ha tamm ar Stad ...  
saoz e-lec'h ren ur politikerezh meur ha n'en devoa

(1) Noblañs. Eus "bon" : "diaz" o tont eus tiegezhioù diazez ha ko shañ ur vro.

ket an danvez anezhañ. Moarvat, ivez, e voe mezevet gant e c'hourdrec'hioù kentañ a viras outañ a welout ne c'helle ket kontañ war an "arluzed" lec'hel re aes o loavañ hag o frenañ er reizhiad c'hladdalc'hel. E kement-se avat ne oa ket Owain Glyndwr disheñvel bras, daoust d'e berzhioù-meur ha d'e ampartiz, d'e ijin zoken, diouzh renerion bolitikel all e amzer a veize ar politikerezh end-eeun evel un doare c'hoari "koll pe zaougement".

VIII. A r p e m z e k v e t k a n t v e d e K e m b r e

Bezef pe vezef, goude ar brezel en em gavas Kembre en he saviad kent, dindan amaezhidi ar gurunenn saoz, he dileuridi, kentoc'h, hag "arluzed" ar "Marz" enleet ouzh roue Bro-Saoz, nemet gwashoc'h un tamm mat. Moarvat e oa bet broudet ha kreñvaet an emskiant bobl e Kembre gant an darsav broadel hogen diskaret e oa bet an armerzh ha rivinet ar vro ; unan eus abegoù an drouziwezh e voe hemañ a-hend-all ; an aotrouion ne voent ket evit sammañ mizoù ar brezel o vezañ ma oa bet lamet diganto mammenn o leveoù : milinoù, grignolioù h.a. Dyffryn Conwy, da skouer, a zeuas da vezañ ur gouelec'h ; steuziet e oa pep hoal-vat diouzh Kembre war-lerc'h an emsavadeg.

An iskisañ eo e padas al lennegezh da vleuniañ bepred e-doug ar grez-se. Ar barzh Dafydd ap Edmwnd, lakaomp, a reizhekaas reolennoù ar gwerzaouerezh d'ar mare-se.

Unan eus gwallheuliadoù all ar brezel dieubiñ kollet e voe meskañ Kembreiz e-barzh kenstokoù diabarzh ar Stad saoz. Anat e voe an dra-se, peurgent,

da geñver "brezel an div Rozenn". An daou dilu breninel a York hag a Lancaster a emstrive e sell da biaoañ kurunenn rouantelezh Vro-Saoz o devoa e-leizh a gestell, a c'hladdalc'hidi, a dud armet hag a verourion e Kembre ; ar "vMortimered", dreist-holl, o devoa arluziezhoù niverus el ledenez. Herri a Lancaster, diouzh e du, a oa perc'henn da c'hwec'h kontelezh eus ar Briñselezh.

Tregont vloaz e padas "Brezel an div Rozenn". Gwell a se e c'hoarvezas pennañ emgannoù ha taolioù ar c'henstok-se war harzoù Kembre. A-benn ar fin e c'hounezas Edouarzh a York - Edouarzh ar pevarzekvet - emgann Mortimers Gros, d'an eil a viz c'hwevrer 1461. A-dreñv dezhañ avat edo tilu kembreat an "dTudured" ("Tudor") a zlee pourchas rouaned da Vro-Saoz, ha setu penaos :

Owain ap Meredith ap Tudur, "gour bonezik" eus tilu Penmynydd-ym-Mon a voe deuet mat a-c'houdevezh da gKatell, intañvez ar roue Herri V, ha dimeziñ a reas ganti dre guzh. Gwarezet e voe o daou vab gant o hanter breur, Herri VI. Eus an hini henañ, Edmwnd, e voe graet kont Richmond, hag eus Jaspas, an eil, e voe graet kont Penfro.

E 1456 e varvas Edmwnd, un nebeut mizioù a-raok ganedigezh e vugele kastell Penfro (eurediñ gant Margaret Beaufort en doa graet Edmwnd). Jaspas a skoras e niz gant kalz a nerzh-kalon, o treiñ Kembreiz tamm ha tamm a-du gant an tilu Lancaster, daoust ma oa d'an tilu York e Kembre ereoù **start** kenañ. Evel-se eta, pa bignas mab Edmwnd war dronrouantelezh Vro-Saoz, dindan an anv Herri VII, e oa stignet an traped a zlee degas Kembreiz da zilezel pep mennad a zishualded vroadel.



Herri VII a oa eus un "teulwezh" kembreat kozh ; ganet e oa bet e Kembre ; da vagerez en doa bet ur gembreagerez ; e Kembre en doa tapet douar pa oa deuet da zifenn e wirioù war ar gurunenn saoz ; d'ar mare-se e reas galv d'e genvroiz, da gentañ, ha tolpañ a reas un niver mat anezho kent argadiñ e enebourion e Bro-Saoz hag o zrec'hiñ e Bosworth. Hiniennoù a soñje dezho er broioù tramor o devoa Kembreiz adc'hounezet o frankiz war zigarez e oa deuet ur C'hembread da gemer ar galloud e Bro-Saoz.

E devoud, evel ma oa kaer gortoz, n'en doa ket Herri VII pignet war an tron e Lunden evit bezañ "Priñs Kembre" nemetken, da lavarout eo, rener ur vroad vihan ha ne zouge bri ebet dezhi ( aze e oa an dalc'h : an danvez Herri VII ne oa ket ur brogarour kembreat). E Bro-Saoz, n'eus forzh penaos, e kave ur stern-oberiañ politikel ledanoc'h hag efedusoc'h un tamm mat eget e Kembre. E gwir, e-lec'h adsevel ar gembreadelezh, e reas Herri VII un danvez folklor anezhi, evel ma ra an holl riezoù trec'h eus broadelezh ar pobloù o deus damesaet. Lakaat a reas an "aerouant ruz" e-touez ardamezioù ar gurunenn saoz ; krouiñ a reas ur bezen kembreat el lu saoz : "Yeomen of the Guard" ("Bagad al Lann-Bihoue", mar karit) (1) ; erfin e roas d'e vab "Arzhur" (un anv kembreat rik ivez) an titl a "bPriñs Kembre".

A-hend-all e voe ar roue nevez brokus mat e-keñver e harperion gembreat, e-keñver Seur Rhys ap Thomas, da skouer, hag ar varzhed dre vras, a voe darboellet evel-se da ganmeuliñ ar renad nevez.

---

(1) Diwezhatoc'h o devoe rouaned Vro-Saoz ur bezen a "Uheldiriz" e kilt en o lu ivez.

E-giz-se eta, dre ar folklor hag an tarwazerezh, e voe touellet Kembreiz ; moarvat e oa prest da vezañ touellet ivez ar re a oa dreistvevet da vrezel dieubiñ Owain Glyndwr (1).

A-dreñv ar vogidell folklorrek e klaske Herri VII reiñ, a-benn ar fin, un dezvad da Gembre e framm rouantelezh Vro-Saoz. An dalc'h e oa reiñ ur stumm lezennel da unanidigezh personel an div vro. Dizurzhiat ha dizunvan a-grenn e oa saviad politikel Kembre d'an ampoent, rannet ha ma oa ar veli etre ar pennadurezhioù kembreat henvoazel hag ar re a oa bet krouet gant ar galloud saoz er "Marz" evit e servij.

Da zirouestlañ al luziadell e savas Herri VII "Kengor Priñs Kembre" ma oa izili anezhañ e vab Arzhur, e vreur, an danvez Herri VIII, ha Mari, e wreg. O labourat a-gevret e klaskas ar re-mañ lakaat un tammig sklaerder en aferioù Kembre. Ne voe peurgaset da benn ar gefridi-se, avat, nemet e 1534, gant Thomas Cromwell a oa deuet da vezañ levier ar C'hengor, ha Rowland Lee (a c'hounezas brud oc'h argas preizherion ha morlaeron diouzh aodoù Kembre). Edod erru neuze e ren Elsbed Kentañ a voe ur ren peoc'hus e Kembre. Setu eta petra e oa danvez al lezenn-unaniñ kinniget gant ar C'hengor hag a voe darbennet gant al levierezh saoz :

- lemel pep diforc'h politikel etre Kembre ha Bro-Saoz ;

- skarzhañ brientoù "arluzed ar Marz" ha tennañ diganto o emrenerezh kent ;

(1) Hiziv an deiz e huñvre c'hoazh "emsaverion" zo e trec'h ur gostezenn c'hall bennak e Paris evit diskoulmañ kudennoù o bro.

- rannañ Kembre e kontelezhioù da debarzhañ da bep hini<sup>ne</sup>, vern he dezvad kent, un derc'houezadur kevatal e Ti ar Gumun, e Lunden ;

- erfin, distrujañ ar yezh kembraek.

Kadarnaet e voe an dazurzhiadoù-se e 1542. An disoc'h anezho e voe d'ar renad saoz atoriñ ar "bonez" hag an danvez bourc'hiziezh kembreat a gavas fred e frammoù ar mererezh saoz : mont a reas an uhelidi da "cherifed", kannaded, barnerion-a-beoc'h h.a.

Kembreiz all eus ar renkad uheloc'h a yeas da glask gourc'hwelioù e Bro-Saoz ivez, evel tud a lezenn pe tud a lez. Kentañ maodiern Elsbed a oa ur C'hembread ; Kembreiz a voe eskibion en Enez Vanav, deaned e Westminster. Shakespeare a ra goap ouzh o saozneg truilhek hogen ne ziskouez ket bezañ gelenus outo. Hiniennoù eus ar renkadoù a-us eta a dennas korvo eus enframmadur Kembre er reizhiad politikel saoz hogen, eveljust, hemañ ne zegasas bevez ebet da bobl Kembre hec'h unan a chomas ur vroad tudigoù baour, skarzhet diouti ar re varrekañ eus he zud, gouestlet d'ar sevel saout ha deñved ; ar greanterezh nemetañ a oa hini ar mezer. Ur c'hendere hepken a binvidikaas, war a seblant : paotred saout a' yae da werzhañ o chatal e Bro-Saoz a vandenadoù bras ; ivez, hini marc'hadourion Amwythig, Croesowallt ha Trallwng hogen kevezañ a raent kenetrezo hag o nevid ne bourchase helv ebet d'ar gouerion baour war ar maez. War-lerc'h an trevadennadur soudardel e rae e reuz, diwar neuze, an trevadennadur politikel hag armerzhel.



En ur stumm eta e c'heller lavarout ez eo bet gwashoc'h, hag a bell, lezenn unaniñ 1536 e Kembre eget hini 1532 e Breizh. Daoust maz eo bet "feur-emglev" 1532 un "Diktat" skridaozet gant an trec'hour en deus hemañ ranket derc'hel kont eus asant ar Breudoù ha reiñ d'e "zDiktat" etumm ur gevrat a wir etrevroadel. Lezenn unaniñ 1536, avat, a zo bet prientet penn-da-benn gant ar galloud saoz ha mennet e oa, e gwirionez, da zistrujañ war-eeun ar vroad kembreat ; an dazurzhiad anezhi a lakae berz war ar yezh kembraek (ha na voe lakaet biskoazh da dalvezout, - gwelout a raimp pelloc'h perak) en diskouez anat.

IX. D i b e n n a r c ' h w e z e k v e t k a n t v e d

Adal 1536 n'he devoe mui Kembre a istor politikel diforc'h, - unan kevredigezhel, ne lavaran ket, hag hemañ eo a studiimp diwar vremañ.

Istor kevredigezhel Kembre etre kreiz ar XVIvet kantved ha kreiz an XIXvet kantved a voe awenet gant ar relijion. En un doare dic'hortoz, evel ma welimp, - rak ar galloud saoz a oa mennet da implijout ar relijion evit hevelebekaet Kembreiz - ar gravez an hini eo a saveteas hag a viras ar yezh kembraek a oa bet barnet d'ar marv gant al lezenn-unaniñ.

E devoud e voe degaset ar brotestantiezh e Preden gant ar gouarnamant saoz evel ur benveg da unvaniñ ar riez, d'e zishualañ diouzh Roma he doa klasket reoliñ ar Stadoù broadel nevez diwanet er grennamzer ; e Kembre, avat, e voe arveret da enfrannañ Kembre da vat er reizhiad saoz, da gentañ.

Gouzout a zleer e c'hellje ar c'hemm kredenn-  
se bezañ bet arvarus meurbet evit ar vroadelezh kembreat.  
Divodet e voe, peurgent, ar manatioù kembreat. Hag int  
dister ha paour - ne oa ket dezho ouzhpenn 200 lur  
sterling leve bep bloaz - e oant niverus a-walc'h;  
bez e oa anezho - ha se a oa a-bouez - goudorioù evit  
ar sevenadur kembreat rak gwarezet e oa ar varzhed gant  
ar venec'h. Ur c'holl rik e voe eta distrujidigezh ar  
manatioù kembreat ; o danvez ne voe ket rannet zoken  
e-touez ar werin ; mont a reas hepken da gargañ yalc'h  
un toullad gouvriaded (1) - an hevelep re bepred -  
gounezet d'ar renad saoz. Prioldi Aberhonddu, lakaomp,  
a gouezhas etre krabanoù ur C'hembread, Seur John  
Price a oa unan a zerc'houezerion Cromwel er gefridi  
serriñ ar manatioù. An deogoù dleet d'an Iliz a voe  
deroet da laiked. An izelgloer a chome er vro n'o  
devoe netra ; tavantek ha dizesk e vanjont. Netra  
souezhus, eta, ma ne voe ket degemeret ar gredenn  
nevez gant gred e Kembre. Dre benn a'n emskiant vroadel  
hag ar vrogarouriezh he devoa graet berzh ar brotestan-  
tiezh e Bro-Saoz ; seurt arbennoù avat n'oant ket  
da gavout zoken e-touez Kembreiz a genlaboure gant  
an alouber saoz hag a oa renet hepken gant skiant  
o gounid. Dindan ren Elsbed, a-hend-all, e tidec'has  
un niver a Gembreiz d'ar c'hevandir evit chom hep  
plegañ d'al lezenn nevez diwar-benn ar relijion, en  
o zouez Gruffydd Robert, beleg katolik, a echuas e  
vuhez en Italia e-lec'h e savas hag e voulas, e-mesk  
oberennoù all, ur yezhadur eus ar c'hembraeg.

Koulskoude, daoust d'ar pezh a c'helled  
doujañ ha d'ar pezh a venne ar galloud saoz tizhout,

e servijas an disivoud e Kembre da ziogeliñ ar yezh ha, dre se, ar vroadelezh. Sachet etre ar youl da zistrujañ ar c'hembraeg hag an ezhomm da ledañ ar buanañ ar gwellañ an ideologiezh nevez a-berzhstad penn-da-benn d'ar riez evit unvaniñ ar rouantelezh e kavas ar pennadurezhioù saoz emsavoc'h ha furoc'h aotren diouzhtu implij ar c'hembraeg a-benn skignañ ar brotestantiezh e Kembre eget gortoz da holl annezerion al ledenez bezañ desket saozneg ervat a-barzh kas da benn ar ratozh-se.

Dija, adal 1546-47 en devoa Seur John Price troet e kembraeg ul levr a zevosion embannet a-berzh an iliz kefridiel saoz "Yn y llyfyr hwn". E 1567 eo, avat, e teuas er-maez an droidigezh kentañ eus an testamant nevez, aozet gant un den a lezenn eus Llanrwst, Wiliam Salesbury ; er bloaz-se ivez e voe moulet al levr-pediñ boutin a-berzh an Iliz saoz kefridiel. Erfin, e 1588, e voe embannet an droidigezh klok eus ar Bibl, prientet gant Richard Davies, Eskob Tyddewi, William Morgan, eskob Llanellwy. Gwellaet e voe an droidigezh-se gant an eskob Richard Parry e 1620. Klokaet e voe ar rummad troidigezhioù-mañ er bloaz war-lerc'h gant ar "Salmoù war gan" danzeet gant Edmwnd Price, arc'h-ziagon Meirionnydd.

Pouezus bras e voe arverañ an holl skridoù sakr e kembraeg rak kement-se a roas tu da Gembreiz ober gant o yezh er gevrenn bouezusañ eus buhez ar gevredigezh en amzer-se, elese, ar relijion ; war un dro e pourchasas ar skridoù-mañ ivez d'ar gembraegerion ur patrom klasel, unvan ha pinvidik eus ar yezh, diazezet war oberennoù ar varzhed ha skrivagnerion



an danevelloù er c'hantvedoù a-raok. Hen ha kemplezh e oa ar patrom-se hogen aotren a rae da Gembreiz chom lodek en un hengoun lennegel kozh ha pourveziñ a rae anezho gant ur c'hevala sevenadurel fonnus o dije ranket hepkorifiñ a-hend-all. Dazont ar yezh a voe diogelet evel-se evit tri c'hantved (ar prantad maz eas ar c'herneveureg da get dre ma oa bet erlec'hiet ar saozneg outañ er servijoù relijiel).

Dav eo ouzhpennañ ne oa ket aet da get henvoaz al lennegezh kembraek poblek e deroù ar grez arnevez. E kreiz ar XVIvet kantved e pade bepred breuriezhañ ar varzhed a zeske gwerzaouerezh luziet ar c'hembraeg krenn d'an danvez barzhed nevez ; dalc'h-mat ivez e kendalc'he ar re-mañ sa sevel meulganoù "ac'hoù" ("lignezoù") ha barzhonegoù giz kozh seurt se. Ar re eus uhelidi Gembre ha na oant ket bet lorbet penn-da-benn gant ar renad saoz a gemere meur en treuzgloziad-se hag a reas o seizh gwellañ evit reiñ tro dezhañ dreistpadout. Tapout a rejont digant Herri VIII, e 1523, ha digant Elsbed ar Gentañ e 1568, brientteulioù a roe koñje d'ar varzhed derc'hel "eisteddfodau" evit arnodennañ emstriverion hag o enwiriañ da embreger o micher ; ar re a veze korballet n'o devoa ket ar gwir da "gorka", da lavarout eo "kanañ evit gounit o boued".

Ne c'heller ket lavarout e voe an diarbenn-mañ ken pouezus ha troidigezh ar Bibl evit asuriñ dazont ar yezh hogen kenoberiañ a reas, hep mar, da dreuzglozañ d'ar rummadoù war-lerc'h peadra lennegel ar vroad.

X. Puritaned ha marc'hegourion  
er XVIIvet kantved

Gwelet hon eus e oa bet unan a heuliadoù an unanidigezh diren istor Kembre d'un istor kevredigezhel gouzañvant ha diemouez koulz lavaret ; unan eus an heuliadoù all e voe meskañ anezhi bepred e kenstokoù diabarzh ar vroad saoz, war-bouez skoanañ muioc'h c'hoazh ar vuhez vroadel e Kembre ha lemel digant broiz elfennoù diwezhañ o emrenerezh. Ar savelenn-mañ a c'heller gwiriañ adarre e sigur ar brezel diabarzh a reas e reuz e Bro-Saoz er seitekvet kantved etre "Puritaned ha marc'hegourion" pe, c'hoazh, etre "Republikaned ha roueelourion".

Lignez an Dudured ne oa ket padet pell e Bro-Saoz. Amsavet e oa bet al lignez-se, eta, gant hini ar Stuarted o orin skosat. E devoud ez erlec'hias ar re-mañ - Jakez ar c'hentañ - an "unkorn" eus Alba ouzh an "aerouant" eus Kembre, petra bennak ma reas berzh Kembreiz bepred e Lunden betek kreiz ar seitekvet kantved.

Ar brezel diabarzh a voe kiriek ivez da zizeriadur an elfennoù diwezhañ eus an tamm melestrerezh arbennik he doa miret Kembre : Priñsed Kembre ne zeujont mui da Gembre ha "Kengor Priñs Kembre", da heul, a baouezas a en em vodañ.

Ar brezel etre "Puritaned ha Marc'hegourion" - an noblañs hag ur vourc'hiziezh zo - ne c'helle nemet noazout ouzh Kembre, evel e Breizh, ur c'hantved bennak war-lerc'h, ar c'henstok etre noblañs, iliz ha bourc'hiziezh en amzer ar chouanterezh. E Kembre

e oa dister kenañ an tuad puritan. Moarvat e oa genidik eus Kembre ur Puritan brudet evel John Perry a voe barnet ha dieneet e 1593 evit bezañ taget an Iliz stadel ; hogen ret e vo gortoz 1639 a-barzh ma vo diazezet strollouigoù "digemplegat" e kreisteiz Kembre war harzoù Bro-Saoz, e Caerwent, Caerdydd, Gwreccsam.

Tonket e oa, avat, da Gembre mont a-du gant ar roue pa darzhas ar brezel etre ar Parlamant ha Jakez ar C'hentañ evit an abegoù-mañ da heul :

- Kembreiz o doa miret ur stuzegezh a oa tostoc'h da hini ar grennamzer eget ar Saozon o unan ; hag int ur bobl a gouerion hag a dirberc'henned e oant boaz da sentiñ ouzh ar reizhveli harpet gant an Iliz ; ur skiant lemm o devoa eus ar fealded personel ; n'oant ket evit meizañ keal difetis al Lezenn hag ar Stad trec'h da wir an hiniennoù ;

- ar c'heal-se, er c'hontrol, a oa bet diorreet e-touez ar vourc'hizion saoz - koulz hag e-touez ar vourc'hizion c'hall - hag en em harpet warnañ o doa rouaned Vro-Saoz - kerkoulz ha re Vro-C'hall - evit startaat o stadoù diwar batromoù al Lezenn roman ; en Europa ar C'hornog ez eo bet an hengoun politikel roman adkavet kentañ arm kealiadurezhel ar vourc'hizion a-enep d'o enebourion renkadel, ar vrientinion hag ar berc'henned-douar.

Bezef pe vezef, an disoc'h eus kement-se eo en em gavas Kembre en tu-koll oc'h harpañ kostezenn ar "Jakezidi" (da notañ eo e voe skoret ar gostezenn-se ivez e Skos hag en Iwerzhon, evit abegoù heñvel ha disheñvel war un dro). E 1643, da



skouer, edo Kembre en arvar ha ret e voe da soudarded saoz a oa bet o flastrañ emsavadeg Iwerzhoniz e 1641 dont war sikour kostezidi ar roue er vro.

Eveljust, avat, ne c'hounezas Kembreiz netra oc'h emellout e brezel diabarzh ar Saozon. Kargidi ar Roue zoken n'o devoe anaoudegezh vat ebet evit Kembreiz en abeg d'o "fealded" ; rak-se, eziwar emgann Naseby e 1645 ne voe mui Kembreiz ken gredus evit stourm a-du gant ar roue. Un arc'heskob eus Kembre, zoken, John Williams, a emzelas e kostezenn ar Sened. Dre vras, avat, ha daoust d'o c'herse, en em gannas Kembreiz evit ar roue betek ar penn, ken na gouezhas kastell Harlech e miz Meurzh 1647.

Milourel rik e voe eta ar gouarnerezh a voe diazezet e Kembre goude trec'h ar Republikaned. Lamet e voe ar galloud a-dre daouarn an uhelidi evit e dreuzglozañ da "dud nevez", Kembreiz ha Saozon, a oa en em gavet e tuad ar Sened. An dra-se a c'hoarvezas dreist-hollwar-lerc'h an eil brezel-diabarzh e 1648 ma kemeras Kembre ur perzh bras ennañ. Oliver Cromwell a zeuas neuze da Gembre, gant ar c'horonal Philip Jones eus Abertawe, hag ur c'horonal all, John Jones eus Maesygarmedd (a voe trubuilhet e 1660 dre m'en devoa mouezhiet ar marv evit ar roue) ; erfin Bussy Mansela voe ezel eus "Sened ar Sent" ; hag int holl a reas o renkoù e Kembre.

Ar re-se holl, padal, distank tre a-hend-all, a oa enframmet a-grenn er reizhiad politikel saoz ha, dre se, ne oant ket nemeur e chal gant mad ha lazoù Kembre. Ar vro-mañ, eta, en em gavas muioc'h enteuzet c'hoazh er Stad saoz goude ar brezel eget a-gent ;

diwar neuze ne voe dalc'het kont ebet eus dezvad arbennik Kembre. Ha moarvat e vije bet gwashoc'h c'hoazh saviad Kembreiz ma vije bet trec'h da vat ar Republikaned. E 1650 e tiferas ar Sened embann ul lezenn "evit astenn an Aviel e Kembre" a oa he mennad degas da Gembre pastored puritan gounezet da vennoziou politikel an drec'hourion da-c'hortoz en ur vro ha na oa ket bet tizhet zoken gant prezegerezh ar Buritaned ; diskarzhet e tlee bezañ ar veleion ha na glote ket oc'hredennoù pe o buhez-egesh gant pennaennoù ar Buritanelezh. Ne oa ket bet kavet, avat, a-walc'h a Buritaned evit kemer o lec'h e Kembre ha divizet e oa bet stummañ "prezegourion-red" d'o amsaviñ. Dre ret e vije bet Saozon eus ar re-se eta.

Ne voe ket tu da gas ar raktres-se da benn. Gwell a se, a c'heller soñjal, rak - evel m'hon eus merket, - kerc'het e vije bet ar bastored reizhkredennek e Bro-Saoz ha war var e vije bet Kembre da vezañ saoznekaet ganto. Padal e voe kavet un nebeut "prezegourion-red" kembreat war an dachenn, e Kembre ; envel a c'heller en o zouez Vavasor Powell, republikan, Walter Cradoc, eus Brynbuga, unan eus pileroù levierzh Oliver Cromwell, Morgan Llwyd, eus an hanternoz, a skignas tezennoù ar Buritanelezh e Kembre, peurgent dre embann e levr tabuterezh politikel relijiel "Y tri aderyn" ("An tri labous").

Gant adsavidigezh ar roueelezh e Kembre d'he saviad politikel kent. Hgozik hec'h holl gannaded e Ti ar Gumun a oa a-du gant ar roue hag an Iliz

stadel. Bez ez adkavas an uhelidi o galloud hogen gwan tre e chomas buhez ar vroad goude m'o devoe Kembreiz uzet o nerzh en ur brezel estren outo (kemendall a c'hoarvezas e Breizh gant Breizhiz antronoz ar chouanterezh). Un diskar bras a voe, peurgent, el lennegezh. Un oberenn a-bouez hepken, estreget an hini hon eus meneget, a voe embannet gant ur roueelour e yezh trefoet e gorn-bro : "Cannwyl y Cymry" ("Kantol Gembreiz"). Gwir eo e voe savet oberennoù all gant un toullad skrivagnerion evel Huw Moris, Glyn Cariog, kouer ha barzh, nag a-du gant breinadurezh al Lez, na gant strizhder-kredenn ar Buritanelezh : protestant en Iliz stadel, leal ouzh an Iliz, leal ouzh ar Roue, didaer ha difaltazi e oa Kembreiz neuze.

Dister tre e voe eta levezon an "emdenniezh"(1) kentañ e Kembre; dav eo lavarout e oa houmañ en he deroù hanter/<sup>politikel, hanter relijiel,</sup> en he c'hreiz, war un dro, kravezidi c'hredus ha politikereion ampart. Relijiell rik e voe avat ar rummad "emdennidi" war-lerc'h a voe heskinet da heul ar brezel diabarzh. A-c'houde 1672, pa voe bet embannet an "Indulgence Act" e c'hellas an "emdenniezh" en em ledañ un tamm bennak e Bro-Saoz hag un tammig bihan e Kembre. E 1676, avat, n'oa anezhi nemet 5% eus ar boblañs e Preden. Bezet pe vezet, d'ar mare-se e voe savet war harzoù Kembre un nebeut chapelioù "emdennat" badezour, krenour h.a. a chomas stag ouzh ar chapelioù saoz ; e Maldwyn hag e Meirion e reas berzh dreist-holl an emdennidi - badezourion anezho er c'hornioù-se - ; "anvadoù" zo (2) a steuzias diwar zouar Kembre

---

(1) Protestantiezh disrannet ha distadel.

(2) Diwar ar c'hembraeg "Enwad" ("denomination" e Saozneg) ranncredenn.



en triwec'hvet kantved, avat, ar Grenourion,  
peurgent : divroet e oant da Amerika, e Pennsylvania.  
An emdenniezh gentañ n'he devoe pouez ebet e Kembre  
biskoazh eta ; en Enez Von, da skouer, ne voe nepred  
ezel ebet anezhi ; al "Lezenn-drugareziñ" zoken ne  
roas tro ebet dezho da greskiñ o niver.

Meur a ziskleriadur a c'heller reiñ da  
zroukverzh an emdenniezh neuze. Unan anezho eo ar  
c'hemm a oa etre stuz politikel kevredigezhel Kembreiz  
hag hini ar Saozon, bet meneget ganeomp: e-touez  
bourc'hizion e reas berzh an emdenniezh e Bro-Saoz  
ha n'oa ket kalz eus ar re-mañ e Kembre. Un abeg all  
a vefe tro-spered Kembreiz, kizidik ha tener, estren  
ouzh kefredelouriezh ha buhezouriezh strizh an emdennidi  
gentañ a bellaas anezho diouzh prezegourion ha na  
ouient e nep doare tizhout o c'halon.

XI. An adreizh vetodistat e Kembre  
en triwec'hvet kantved

Gwelout a raimp bremañ perak ha penaos ez  
eas buan war-raok, er c'hontrol, an eil "emdenniezh"  
(1), hini Vetodistiz en triwec'hvet kantved hag en  
hanterenn gentañ an 19vet kantved, e Kembre.

Muioc'h eget ur reveulzi relijiel eo bet  
an adreizh vetodistat er vro-se. Hervez John Edward  
Llwyd ez eus kement a ziforc'h etre Bro-Saoz ar rouanez  
Ann ha Bro-Saoz ar rouanez Victoria hag ez eus etre  
Kembre ar seitekvet kantved ha Kembre kreiz an XIXvet  
kantved.

Kent plaenaat ster ha talvoudegezh an

-----  
(1) Notañ a zleer e chomas ar Vetodistidi stag ouzh  
an Iliz kefridiel betek deroù an 19vet kantved ha n'oa  
ket a-du an diazezerion e Kembre evit ma vije disrannet  
o chapelioù diouzh an Iliz.

adreizh-se eo dav klask lec'hiañ houmañ e kenedgouezh kevredigezhel hag istorel Kembre. Moarvat ez eo kenstur an adreizh-se d'an hini a c'hoarvezas e Breizh er seitekvet kantved, ha da houmañ e oa, e gwirionez, an hevelep boniad ha keindir kevredigezhel ha d'an adreizh vetodistat e Kembre. Hogen disheñvel bras e voe an daou luskad e meur a geñver, a-hend-all, evel ma klaskimp diskouez diwezhatoc'h.

Displeget hon eus endev penaos ne oa ket bet Kembre lodek da vat en disivoud a oa bet harpet a-zevri gant ar Saozon er XVIvet kantved. Divodet e oa bet ar manatioù a roe bod ha goudor d'ar varzhed; ar veleion c'hredusañ a oa bet heskinet ha darn anezho o doa ranket divroañ ha mervel en harlu. Ar re a oa chomet a oa bet enframmet a-c'houdevezh en Iliz Stadel e-lec'h e oant deuet da vezañ kargidi, o terc'hel un tammig lec'h ar skolaerion war ar maez er grez arnevez ; war ar marc'had n'oa ket bet pledet gant o stummadur ha dizesk a-walc'h e oant dre vras, nebeut a c'hred dezho ivez dre se end-eeun. Gwashaet e oa bet stad ar gravez diwezhatoc'h gant ar brezel diabarzh hag an dizurzh a oa deuet en e ser. Ne oa ket kalz tra da c'hortoz eta digant amaezhidi a-du gant ar gevredigezh diazezet, feal d'al lignez hanoverat e Lunden, oc'h en em harpañ war an noblañsoù hag ar berc'henned-douar, ar "stiwared" h.a. An holl re-se a oa nebeut e chal gant ar werin, zoken evit gwellaat he stad war dachenn ar relijion.

Ret e voe, avat, gortoz eil palevarz an triwec'hvet kantved a-barzh ma voe boulc'het da vat an adreizh. E deroù ar c'hantved-se e oa bet dalc'het

ar speredoù e Kembre gant ar politikerezh ha strivadennoù diwezhañ ar gostezenn jakezat evit degas an emyouler (1) war an tron e Lunden ; gouzout a reer e oa bet skoret an arnod-se dreist-holl gant Uheldiriz en Alba hag e oa bet gwallglazet gant drouziwezh Culoden a oa troet d'ur ouennlzh eus gouezelegerion ar vro-se. E Kembre, ret eo lavarout, n'oad ket bet gwall domm biskoazh ouzh ar gostezenn jakezat d'ar c'houlz-se nemet en un nebeut kelc'hioù kefredourion en hanternoz hag er c'hreisteiz. Ar blenier brudetañ anezho a oa bet Seur Watkyn Williams Wynn, kannad Dinbych. Dre se ivez ne voe kavet skoazell sirius ebet e Kembre da stourmadegoù ar Jakezidi e 1715 hag e 1745; dillo, e gwirionez, e steuzias ar jakezadegezh diwar zouar Kembre (2).

Kement-se n'eo ket souezhus rak a-benn neuze, e 1745, e oa kroget an adreizh vetodistat e Kembre ha prederiet e oa muioc'h ar speredoù er vro-se gant ar relijion eget gant ar politikerezh.

Hogen, peseurt orin a oa d'al luskad nevez e Kembre dres ? E gwir e ranker klask gwrizioù an adreizh-se er strivadennoù dengar a voe renet eno etre 1665 ha 1735. Tud a feiz, o kavout truezus saviad an deskadurezh hag ar relijion e-touez tud ar werin unyezh, en em glevas kenetrezo evit kelenn ha sklerijennañ o c'henvroiz. Unan anezho e voe Stephen Hughes, eus Meidryn, kontelezh Caerfyrddin, kure puritan a gollas e blas en abeg d'e vennoziou e 1661. Hemañ a felle dezhañ, avat, "mont d'ar bobl", ur mennad a oa sellet evel difur gant e renerion -

---

(1) Ober a ran gant ar ger-se evit treiñ ar ger kembraek "ymhonnwr" pe "prétendant" e galleg.

(2) Kv. "Gweledigaethau y bardd cwsg" e 1703 a damalle follentez ha pilpouzerezh ar Jakezidi.



ha daoust d'an trubuilh a c'houzañvas a-berzh pennad-  
urezhioù e iliz e kavas skoazell e-touez izili zo  
eus houmañ, izili gredus en sikouras da embann levrioù  
a zevosion evit ar werin ; e-mesk e harperion en em  
gavas zoken William Thomas a voe eskob Tyddewi.

Er rummad war-lerc'h e voe diazezet ar  
"Gevredigezh evit ledañ ar gelennadurezh kristen"  
("S.P.C.K." an arouezskrid anezhañ e saozneg) gant  
Seur John Philipps, un uheliad pinvidik, eus Castell  
Pictwn e kontelezh Penfro ; ar gevredigezh-se an hini  
eo a sammas warni krouiñ rummadoù kentelioù da zeskiñ  
lenn ar Bibl e kembraeg penn-da-benn da Gembre.

An oberour brudetañ a bledas gant ar skolioù-  
se avat e voe Griffith Jones (1683-1781), person  
Llanddowror e kontelezh Caerfyrddin. Ur breur-kaer  
da John Philipps a oa anezhañ, e skoazeller ivez,  
hag hemañ, a-hend-all, a bourchasas dezhañ e vividigezh.

Griffith Jones, eta, a aozas ur rouedad  
skolioù-red a oa karget da zeskiñ lenn ar Bibl hag  
ar c'hatekiz e pep parrez ; ne chome ket ar skolaerion  
ouzhpenn tri miz en ur vourc'h bennak ; ur wech m'o  
deveze stummet un toullad 'lennerion' gouest da  
zeskiñ lenn d'ar re all ez aent da labourat en ur  
barrez all. Efedus e voe ar reizhiad-kelenn-se hogen  
merkañ a ranker ne c'hellas bezañ diorreet nemet  
a-drugarez da vrokusted un toullad madoberourion  
ha madoberourezed evel Madam Bevan (Mrs. Bridget  
Bevan) ha re all, darn anezho Saozon, zoken,  
a-hend-all.

Diaes eo spisaat da vat peseurt darempredoù  
a voe etre Griffith Jones hag al luskad metodistat  
a greskas e-pad palevarzh diwezhañ e vuhez. Derc'hel

a reas e skolioù-red bepred a-ziforc'h diouzh al luskad-se ; diouzh un tu all avat e voe ur mignon feal hag un alier mat da bennañ renerion ar Veto-distiezh e Kembre.

Berzh a reas an adreizh relijiel e Kembre dre ma oa meizet evit ur werin amzesket ha didro ha prestoc'h, dre se, da zarbenn arguzennoù ar galon eget re ar poell ha na oa ket stag mat a-hend-all ouzh un Iliz bet e servij ar binvidion hag an aotrouion, hag a roe pouez bras a-hend-all d'an dereadegezh ha d'an urzh ; dres, ne oa ket bet dedennet gant an emdenniezh kentañ dre ma oa houmañ un afer bourc'hiz-ion desket, kefredourion ha poellegourion anezho en ur stumm, diorreet ganto un doueoniezh krin ha kalet ha na roe lec'h ebet d'ar gizidigezh ha d'ar faltazi ; dibleg e oant moarvat, strizh evito hag an holl, hogen serret warno o unan, o virout o gwirionez evito o unan hag emellet dreist-holl gant o eneberezh ouzh an iliz stadel.

War an trivlierezh e oa diazezet, ar c'hontrol, ar vetodistiezh ; n'he devoa kelennadurezh arbennik ebet (diwezhatoc'h, hepken, e tiwanas en he c'hreiz an tabutoù diwar-benn doueoniezh, darn o tegemer ar galvinadegezh - e Kembre peurgent - , lod all o vont da heul Wesley) ; ar renerion gentañ a felle dezho bezañ leal ouzh an Iliz kefridiel ha chom hep en em dennañ diouti (ar rummad a zeuas war o lerc'h n'o heulias ket war ar poent-se).

Evit broudañ an emskiant relijiel e-touez Kembreiz ez implijas Metodistiz a bep seurt hentenoù : prezegerezh dindan an amzer, kanerezh a lazoù, abadennoù pediñ er chapel hag er gêr, renerezh speredel ; unan

eus o ensavioù e voe ar "Seiat" (eus ar ger saoznek "Society", kevredigezh ar Sent ma oa skarzhet diouti dizamantkement pec'her a nac'he dilezel e bec'hed; nep piv bennak a veze tamallet dirak ar "Seiat" ne c'helle chom ezel nemet o tiskouez e oa mennet da gemm buhez). Dindan ur seurt reizhiad e renas ar vetuz hep dale penn-da-benn da Gembre, oc'h argas diouti an holl ziduamantoù dañjerus evel ar c'horolloù hag ar c'hoariva. Douar ar Sent e oa deuet da vezañ Kembre.

An disoc'hoù-se, avat, ne voent tizhet nemet war-bouez ul labour brudañ ha kenurzhiad dalc'hus ha pennek. Ebestel ar vetodistiezh e Kembre a reas dekmiliadoù ha dekmiliadoù a "viltirioù" war varc'h evit prezeg an aviel ha skignañ pennaennoù ha kelennadurezh ar vetodistiezh e pep lec'h er vro.

Tri den, dreist-holl, o devoe ur roll pouezus e kresk al luskad e Kembre.

An hini kentañ a voe Daniel Rowlands (1713-1790) a vevas e Lengeithio, e kontelezh Ceredigion. Eus un tiegezh tud a iliz e oa hogen eñ e unan ne gemeras karg ebet en iliz daoust ma voe urzhiet. Adal 1735, pa voe deuet dindan levezon Griffith Jones, e troas d'ur prezegour entanet. Hemañ a voe gwir rener al luskad metodistat e Kembre.

An eil a voe William Williams (1716-1791). "Emdennad" e oa a c'hanedigezh. Padal e teuas da vezañ ilizour hag urzhiet e voe diagon : politikerezh ar Vetodisted e oa, en deroù, - se hon eus lavaret - labourat e framm an iliz kefridiel.



D'ar mare ma oa bet urzhiet eo e oa bet "distroet" gant Hywel Harris a oa bet e dad er feiz vetodistat. E 1743 e roas e zilez a gure en iliz stadel hag en em ouestlañ a reas d'ar prezegerezh-red. Adal 1744 ez embannas levrennoù bihan a imnoù, e "gwerzennoù dieub" (da lavarout eo, hepken, hep klotennoù diabarzh diouzh giz ar c'hrenngembraeg). Barzh ha skrivagner brasañ an adreizh e voe. Daoust ma n'eo ket disi e yezh ez eo heverk e oberenn dre zonder ar buhezadur relijiel en em ziskouez enni.

Hywel Harris (1714-1773) a zo an hini anvekañ eus diazezerion ar vetodistiezh e Kembre. Tud ampart a oa da gavout en e gerentiezh hag unan eus e vreudeur, da skouer, a dapas ur garg uhel e Ti ar Moneiz e Iunden. War-dro ugent vloaz, e 1735, e voe distroet d'ar relijion hag e tizoloas e c'halvedigezh. Diwar neuze en em ouestlas d'ar gravez ; fellet en dije dezhañ ivez degemer an urzhiadur a veleg en iliz kefridiel evel Rowlands ha William Williams ; hogen anavezet ha ma oa evel "prezegour entanet" - da lavarout eo "pennfollet" pe, da vihanañ, berrboell e soñj an ilizourion fur - ne voe ket roet dezhañ e c'hoant brasañ. Laik e chomas Hywel Harris eta. Kement-se ne viras ket outañ a c'hoari ar roll pennañ, marteze, en emled ar vetodistiezh e Kembre, nemet, na petra, morc'hedet e vanas e-keñver e genvreudeur a oa bet urzhiet en iliz ha kement-se a ziskleir perak ne voe ket didrubuilh e zarempredoù gant renerion all al luskad a-hed ar wech.

Goude bezañ gweladennet Griffith Jones e 1736 ha bezañ kejet gant Daniel Rowlands e krogas Hywel Harris da brezeg an aviel e pep lec'h, dalc'hmat

war varc'h, krec'h-traoñ, dre Gembre. Kenurzhiat e veze gantañ bodadoù an distroidi ha roet kuzulierion speredel dezho.

E 1742 e voe dalc'het ar seziad kreiz kentañ evit urzhiañ labour an aozadur nevez - ha na venne ket bezañ distag diouzh an iliz kefridiel, kounomp - ha kempenn ar melestradur anezhañ. Hañvalout a rae al luskad en em astenn a-herr dre ar vro pa voe torret e lañs gant un disrann a c'hoarvezas neuze etre dalc'hidi Daniel Rowlands ha re Hywel Harris. Rebec'h a rae Daniel Rowlands ouzh H. Harris, eta, skignañ kammgealiadoù a zoueoniezh, bezañ Moraviad, en ur ger (1), ha diouzh un tu all reiñ krog da damalloù enebourion al luskad dre e zarempredoù gant "Madam Griffith" (2). Eus houmañ e felle da Hywel Harris ober un doare 'profedez' e-giz an Testamant kozh; e gwir - hag eñ dimezet a-hend-all - e selle outi evel ur meni renerez koustiañs a roe kuzul dezhañ war gementdiviz en deveze da gemer. Daoust ma vanas e zarempredoù gant ar vaouez-mañ bepred e rez ar speredelezh - ha, moarvat, ivez, an drivliadelezh - e touje e genvetodistiz e Kembre o dije eneberion al luskad graet o mad eus <sup>/an</sup> amsteriegezh anezho evit kavout abeg e buhezgezh an izili dre vras ha lousañ an emsav penn-da-benn. Goulennet e voe digant Hywel Harris paouez a bloustriñ Madam Griffith hag o vezañ m'en doa nac'het e voe dilezet gant e geneiled. En

(1) War a seblant - rak n'em eus ket studiet ar gudenn - ne rae ket Moraviz un diforc'h splann etre kentañ hag eil gour an Dreinded.

(2) Pried ur perc'henn-douar e oa, nemet n'en em gleve ket gant he gwaz a oa enebet ouzh an adreizhourion; a-benn ar fin e rankas kuitaat he fried. Er penn-kentañ e oa bet un doare hanterourez etre an div gostezenn hogen chomet e oa gant Harris a-benn ar fin.

em dennañ a reas Hywel Harris, eta, diouzh e du ha bodañ a reas en-dro dezhañ e Trefecca ur gumuniezh a wazed, gwrazez ha bugale - tiegezhioù ha tud dizemez, nemet galvet d'ober dimezioù mat e diabarzh ar gumuniezh - a genvevas en ur c'hevredad gounezel dornwezhel emvastus, dindan kenurzh ur vetodistiezh strizh ; un doare kevelouri e oa, eta, Trefecca, gouestlet dreist-holl, evel m'hon eus damveneget, d'al labour-douar hag, e gwirionez, e tegasas gwellaennoù da skiant ar gounezerezh. Eveljust e voe pismiget intrudu Hywel Harris ha karezet e voe gant e vignoned kozh, peurgent, evit bezañ savet ur seurt manati diouzh giz ar "Bapisted" (argarzhnet koulskoude gant rener Trefecca) ; e gwir e veze gouestlet kalz amzer bemdez er gumuniezh d'ar bedenn ha da bleustradennoù relijiel ; padal, kentoc'h, e tenne ar gevelouri-mañ d' ur gendrev nemet e c'hoarie, evelkent, roll ul leandi dre ma oa anezhi ur greizenn speredel evit Metodistiz.

Pa varvas Madam Griffith, - abred a-walc'h, e 1752 - e paouezas poanioù spered an Tadoù Metodistat e Kembre. En em adunvaniñ a reas Daniel Rowlands ha William Williams gant Hywel Harris hogen. hemañ ne adkrogas ket gant e droiadoù-prezeg evel m'o doa bet spi e genvreudeur. Menel a reas e penn kendrev Trefecca ha kenderc'hel a reas d'he diorren evel kreizenn speredel ar vetodistiezh.

War-lerc'h marv diazezerion an adreizh e Kembre e padas emled al luskad betek kreiz ar c'hantved war-lerc'h ken na voe gounezet ganti an tri-c'hard eus annezidi al ledenez. Adal 1811, avat, e teuas an aozadur relijiel da vezañ distag diouzh an Iliz



Stadel. An disoc'h-se a c'helled gedal abaoe ar penn-  
kentañ daoust da youl ha da c'hoanagoù renerion gentañ  
an adreizh a spie e vje deuet mat o luskad, a-benn ar  
fin, da bennadurezhioù an Iliz kefridiel ; hogen estreget  
n'he doa ket an Iliz-se ur framm diorreet ha liant  
a-walc'h evit ensammañ intruduioù liesseurt - pezh  
a gaver, en eneb, en Iliz katolik a c'hell klenkañ en  
he framm-hi ensavioù liesseurt krouet diwar intrudu  
an hiniennoù,-e chome atebion an Iliz stadel e Kembre  
aheurtet en o rakvarnioù ouzh Metodistiz ma rebechent  
outo dalc'hmat bezañ trelatet ha diboellet. Diouzh un  
tu all e oa deuet d'ar vetodistiezh un niver a izili  
eus an "emdenniezh" kentañ ha n'odevoa c'hoant ebet  
da zistreiñ da graou an iliz stadel. Oc'h en em zispartiañ  
da vat e 1811 ne rae renerion an "anvad" nevez nemet  
gwiriañ ur saviad ha n'oa tu ebet da zistreiñ diwarnañ.

XII. M e n t e l i a d   a n   e m s a v   m e t o d i s t a t  
e   K e m b r e

Komz a raimp adarre eus emdroadur al luskad  
methodistat er pennad war-lerc'h. Padal, adal bremañ,  
e klaskimp pouezañ menteliad ar vestodistiezh er vro-se.

Da gentañ e notimp - pezh hon eus merket  
a-gent - e voe tregemmet a-grenn buhezegezh ha speredegezh  
Kembreiz diwar levezon an adreizh relijiel-mañ.  
Kembreiz a zeuas da vezañ ur bobl devot ha sirius,  
o kemer a-zevri an aviel, prest da vreutaat bepred  
diwar-benn kudennoù parfet an doueoniezh, e-touez ar  
bobl zoken. Diwar ar mare-se e tilezjont ivez an  
deverrañsoù aner. Marteze ez ejont re bell war an  
tu-se. En eskemm, avat, e c'hounezjont ur sevded,  
un aketusted, ur siriusted, end-eeun, a voe talvoudus

dezho er stourmoù o devoe da ren er marevezh kempred, ken war dachenn ar gevredigezh, ken war dachenn ar vroad.

Peogwir e reomp amañ istor ur gumuniezh politikel e ve da arsellout ivez gwered al luskad metodistat war ziorreidigezh pe goazhidigezh an emskiant bobl e Kembre.

Er c'heñver-se e c'heller lavarout ez oberias Metodistiz, er pleustr, evit diogeliñ ar vroadelezh en arbenn a'n implij a rejont eus ar yezh.

Daoust ma n'eo ket ereet strizh yezh ha spered broadel da bep mare eus istor ur bobl - skouerioù eus ar wirionez-se hon eus e Breizh hag e Kembre end-eeun - ez eo miridigezh ar yezh - ha pa ve en ur par kalvezel hepken, koulz lavaret - unan eus amplegoù dreistpaderezh ur gumuniezh politikel bennak. Er feur-se ez eus tu da wiriañ ez eo bet emsavus gwered al luskad e Kembre ; gant Metodistiz e teskas Kembreiz, n'eo ket hepken lenn ar Bibl - arabat disoñjal, kennebeut, roll ar skolioù sul e deroù an XIXvet kantved evit lizher-ennañ Kembreiz, evel ma welimp er pennad da heul - hogen, ivez, en em akoursañ ouzh breutadegoù kefredel a bep seurt diazezet war an doueoniezh ; betek e dibenn an XIXvet kantved e vo kavet e Kembre, kouerion ha micherourion unyezh gouest da verat e kembraeg kudennoù luzietañ ar gravez kristen ha kelaouennoù stank e kembraeg penn-da-benn gouest d'o c'helenn war ar poentoù-se.

A-hend-all ez eo ret anzav n'o doa ket Metodistiz e Kembre, evel ma c'heller bezañ en

gortoz, ur mennad brogar arbennik o plediñ gant Kembre hag oc'h ober gant ar c'hembraeg : unyezherion gembraek a oa eus Kembreiz, setu holl. En deroù, zoken, o devoe Metodistiz Kembre darempredoù

a-walc'h gant re Vro-Saoz, Gant Whitefield, peurgent ; kemer a rejont perzh, da skouer, e seziad Watford, e 1743, e-lec'h e oa Whitefield, dres, rener an dalc'hoù-labour, hag Hywel Harris, amsaver. Diwezhatoc'h e keje an adreizhour kembreat-mañ aliesik gant Metodistiz Lunden, dreist-holl d'ar mare m'edo oc'h hentiñ Madam Griffith ; hogen kement-se a voe rebechet outañ gant e genvreudeur a zouje, emichañs, e vije bet pellaet diouzh an dachenn-oberiañ e Kembre gant an henterezh-se.

Dre ret e voe troc'het al liammoù etre Metodistiz Kembre ha re Vro-Saoz en abeg d'ar yezh. War ar marc'had e tarbennas Kembreiz ar galvinadegezh evel kelennadurezh doueoniell kefridiell o ranncredenn, - ar pep brasañ eus Metodistiz Kembre, da vihanañ - tra ma tegemere Metodistiz Vro-Saoz kelennadurezh Wesley ; ret eo ouzhpennañ en em ledas ar Vetodistiezh e Kembre kalz muioc'h eget e Bro-Saoz ; e gwir e vo tost dezhi distroadañ an Iliz kefridiell eno.

A-hend-all he devoe ar Vetodistiezh ul levezon hanterat hepken war emdroadur ar politikerezh e Kembre ; kiriek e voe, evit darn, da emled ar frankizouriezh er vro en XIXvet kantved (en abeg da graf digevreadur an Iliz stadel hag afer al "levrioù glas") hag, un tamm bennak ivez, da zihun an emskiant vroadel en XXvet kantved o vezañ m'en em gavas pastored vetodistat e-touez taerañ difennourion ar yezh vroadel d'ar c'houlz-se.



War hir dermen hepken, avat, e voe sevenet ar gwered-se. En deroù holl he devoe ar vetodistiezh un efed kilstourmelour kentoc'h. Daoust ma oa emezelet enni, dreist-holl, kouerion ha kenwerzhourion vihan ez asante - evel ma raed peurvuiañ e-touez an dud a feiz en amzer-se - d'an urzh ha d'ar gevedigezh diazezet, dre ziseblantted relijiel ha gwazhwelouriezh politikel ; seurt tro-spered a oa hini an Iliz stadel hogen arabat eo ankounac'haat e chome renerion gentañ ar vetodistiezh stag-tre ouzh an iliz kefridiel.

Lavaret eo bet zoken ez eo bet skoilhet ha mouget mennozioù an dispac'h gall e Kembre gant berzh an adreizh relijiel ; e devoud n'eus ket bet kalz Kembreiz o tuiñ d'ar mennozioù-se en XIXvet kantved, nemet Gwilym Hiraethog ha Glan-Y-Gors. Hogen, n'eus forzh penaos, ez eo arabat kennebeut disoñjal e oa Kembreiz bepred unyezherion d'ar c'houlz-se ha diforc'het, dre se, diouzh froudadoù ar vuhez kefredel europat.

Ma keñverier, eta, a-benn ar fin, disoc'hoù an adreizh relijiel e Kembre en XVIIIvet kantved hag en hanterenn gentañ an XIXvet kantved ouzh disoc'hoù adreizh relijiel Vreizh er XVIIvet kantved pe en hanterenn gentañ an naontekvet e ranker gwiriañ ez eo bet disoc'hoù an adreizh e Kembre kalz skorusoc'h eget re Vreizh d'ar vroadelezh dre vras. Adreizh relijiel Vreizh er seitekvet kantved n'he deus ket desket d'ar bobl lenn he yezh na diorreet en he c'hreiz ur vuhez kefredel e brezhoneg ; n'he deus ket desket dezhi kennebeut en em genurzhiañ ha krouiñ aozadurioù diouzh hec'h ezhommoù. Moarvat ez eus bet skignet

e-leizh a levrioù a zevosion e brezhoneg e Breizh-Izel ha, peurgent, e rannvro Wened ; re baour ha re skors e oa ar yezh anezho evit magañ ur vuhez kefredel bennak ; seizet eo bet ur seurt buhez gant an diouer a hengoun lennegel broadel ha rannyezhekadur ha trefoedadur ar brezhoneg skrivet e unan. En arbenn a se ivez ne voe ket barrek an urzhioù hag an tolpadoù relijiel a voe krouet e Breizh en hanterenn gentañ an naontekvet kantved da wriziennañ da vat er vro ha da c'hoari ur roll bennak en he buhez. Buan tre e voent atoret gant an Iliz c'hall e Breizh betek koll a-grenn pep liv breizhat.

An diazez a vanke neuze moarvat, setu an abeg ha n'emaomp ket e soñj amañ tamall an Iliz e Breizh muioc'h eget ar Stad c'hall hec'h unan, d'ar c'houlz-se bepred. Evit bezañ reizh a-hend-all - peogwir e vez enebet alies misionoù 'a-berzh stad' an Tad Maner ouzh emsavadeg ar Bonedoù ruz-e ranker ouzhpennañ ne oa ket an emsavadeg-se - lakaet e vije bet renet gant gant ur gelennadurezh politikel bennak, ar pezh n'eo ket anat tamm ebet - muioc'h e chal gant lazoù Breizh sellet evel ur gumuniezh kevredigezhel politikel eget misionoù an Tad Maner o unan. Dre se ez eo didalvez d'an emsaverion keferata hag enebañ an eil re ouzh ar re all an daou rumm anadennoù kevredigezhel-mañ a c'hoarvezas e Breizh da vare an adreizh relijiel er seitekvet kantved.

XIII. A n n a o n t e k v e t k a n t v e d :  
r e l i j i o n h a p o l i t i k e r e z h

E 1811 e oa a-boan 600.000 a annezherion e Kembre (nebeutoc'h eget e "Breizh-Izel"d'an hevelep

mare) hag int dasparzhet en un doare kevatal etre Hanternoz ha Kreisteiz. Kant vloaz war-lerc'h, e 1930, lakaomp, e oa 2.500.000 a dud o vevañ e Kembre hogen ne oa mui nemet ur c'hard eus ar re-se o chom en hanternoz. Ar vetalouriezh hag ijinerezh an houarn, peurgent, hini ar glaou a oa an diazez anezho, a voe kiriek d'an treuzfurmadur-se tra ma steuzie, en eneb, mengleuzierezh ar c'houevr a vleunie en Enez Von hag hini ar ploum e Ceredigion er c'hantvedoù kent. Ar c'hêrioù marc'had a oa bet oberiant etre Abertawe ha Casnewydd war aod ar c'hreisteiz a zeuas da vezañ tudet stank ; en em astenn a reas rouedad an hentoù-houarn dreist da baludoù Gwent ha Morganwg ; ar c'hrugelloù kailh a gemmas penn-da-benn gweledvaoù ar rannvroioù-se. Deredek a reas Kembreiz an hanternoz war-du ar c'hreisteiz da glask fred, war un dro gant Iwerzhoniz - aet da saoznegerion - ha Saoznegerion all diwar an harzoù. An heuliad eus an aloubadeg-mañ eo e tirollas lanvezhiad ar saozneg war greisteiz ar vro, o lezel hepken enezennadoù a gembraegerion en taoleadoù plouezat pe en-dro d'ar chapelioù kembraek er c'hêrioù ijinerezhel.

Hogen a-barzh komz eus kresk an ijinerezh ha tregemmadur ar gevredigezh kembreat dindan levezon ar reverzhi c'hreantel e klaskimp echuiñ istor ar vetodistiezh en hanterenn gentañ ar c'hantved-mañ. Displeget hon eus penaos o doa divizet renerion al luskad dilezel an Iliz stadel, urzhiañ o unan o danvez "prezegourion" hag ober, eta, eus o "chapelioù" un "anvad" dizalc'h (a-ratozh ez implijomp ar ger "chapel" , anezhi ur savadur aozet gant Metodistiz tra ma oa miret an ilizoù kozh d'an Iliz kefridiel).



Un enkadenn a oa bet el luskad endev e dibenn an triwec'hvet kantved, da heul tabutoù a oa savet diwar-benn "kelennadurezh", da lavarout eo, diwar-benn doueoniezh. A-drugarez da dThomas Charles a voe eil kenurzhier al luskad, ez eas Metoïdistiz dreist d'an enkadenn-se.

Thomas Charles a voe ganet e kornog kontelezh Caerfyrddin. Beleg parrez e voe, da gentañ, hogen ur wech troet d'ar vetodistiezh e teuas d'en em staliañ er Bala, evel "prezegour" ("pregethwr") e 1784. Eno e savas un doare kelenndi a bourchasas frammoù an anvad, "prezegourion" vetodistat Kembre. Ur greizenn stummañ, un doare 'kloerdi' a oa anezhi en hanternoz Kembre ha brud a c'hounezas er vro en XIXvet kantved (kv.romant Daniel Owen : "Rhys Lewis"); servijout a reas kalz ar greizenn-se da ledañ ar rangredenn en hanternoz.

Thomas Charles an hini eo a roas ur "vonreizh" d'an Iliz vetodistat kembreat ; krouiñ a reas un dastumadenn a zoueoniezh a voe anvet ar "Geiriadur" hag embann a reas un "Hyfforddwr" ("Katekiz") a voe desket dindan eñvor gant rummadoù a vetodistiz kembreat.

Unan eus e vinvioù efedusañ e voe ar "Skol Sul" hon eus meneget a-ziagent hag a voe savet gantañ daoust da eneberezh "puritaned" zo eus e rangredenn e unan ha na felle ket dezho e nep doare e vije torret an disterañ lezenn ar 'Sabad'. Skolidi a bep oad hag a bep dere en em gavas er skolioù-se da lenn ha da studiañ ar Bibl ; en-dro d'ar "Skol Sul" avat e tiwanas hag e kreskas ur vuhez lennegel ha sevenadurel liesseurt a reas eus Kembreiz er c'hantved-se unan eus ar pobloù ar muiañ seven en Europa.

Er c'heit-se, un herradig amzer a-raok 1811, o devoa ar Vetodisted Wesleat - na zegemerent ket kelennadurezh Calvin - taolet o zroad e Kembre. Thomas Coke, eus Aberhonddu, a zifraostas an dachenn an hini kentañ. Kas a reas e unan daou visioner a grogas gant o labour e Rhuthyn. Dont a reas Kembre, evel-se, da vezañ repu pevar anvad emdennat : dizalc'hidi ha badezidi, an emdenniezh kozh, hag an daou anvad metodistat nevez. Niver izili ar pevar anvad-se a greskas kalz e-kerzh an naontekvet kantved (1). Levezonañ a rejont ar boblañs war dachennoù a bep seurt, hini ar gevredigezh, al lennegezh, ar sonerezh, h.a. Derc'hel a reas ar "brezegourion" ur roll bras e buhez ar vroad ; miliadoù ha miliadoù a dud a zeue d'o selaou : John Elias, eus Mon, William Williams, Christmas Evans. Dedennet e oa an holl dud yaouank a dalvoudegezh neūze e Kembre gant ar bastorelez (2) ; krouet e voe e pep lec'h 'kloerdioù' evit o stummañ, er Bala, Llangollen, Trefecca, Hwlfordd, Pontypridd.

Gwellaet e voe an Iliz Diazezet hec'h unan gant skouer ar Vetodisted. Ne voe ket mui eus an eskibion Saozon, mall warno kaout ur plas uheloc'h e Bro-Saoz. An eskob Burgess a grouas "Coleg Dewi Sant" ("Skolaj Sant Dewi") e Llanbedr da bourchas beleion d'an Iliz kefridiel e Kembre. An eskob Short a savas skolioù parrez ; an eskob Olivant a adeiladas ilizoù nevez. Prezegourion nerzhus he devoe ivez an Iliz kefridiel evel David Howell, dean Tyddewi.

(1) Bruzhunet eo ar vuhez kravezel e Kembre betek henn. E-tal ar pevar anvad hon eus meneget eo ret lakaat an Iliz kefridiel, ar Gatoliked (distroet gant Iwerzhoniz) ha ranngedennoù disteroc'h evel an Undedourion h.a.

(2) Heñvel e oa ar gont e Breizh en naontekvet kantved. An holl baotred a dalvoudegezh war ar maez a yae da veleg.

Ur C'hembread eo a voe, ivez, dilennet evit bezañ eskob Llanellwy, Joshua Hughes.

Heuliad an adreizh relijiel-se a voe, evel m'hon eus merket, diwall poblañs Kembre diouzh levezon mennoziou an Dispac'h gall da vare ar reverzhi c'hreantel. Bez e voe er vro-se, koulskoude, un nebeut dalc'hidi d'ar mennoziou-se ; anv hon eus graet dija eus hini pe hini anezho, John Jones Glan-y-Gors, peurgent. Ret e vefe ouzhpennañ ar Badezad Morgan John Rhys a repuas er Stadoù-Unanet da c'houde hag ar pastor Undedour David Williams a ziazezas ar "Royal Literary Fund". Evit John Jones Glan-y-Gors, mestr un davarn e oa e Lunden ha lakaat a reas e kembraeg damkaniezhou Thomas Paine. Digenvezet a-grenn e oa an holl stourmerion-se avat. Rak kounañ a reomp, a-hend-all, e oa ar Vetodisted kentañ arloupet a-enep d'ar mennoziou nevez, dreist-holl ar prezegour brudet John Elias a darane en e brezegennoù a-enep dezho (1).

An emdenniezh kozh - dizalc'hidi ha Badezidi - a oa frankizourion, kentoc'h, hogen, ivez, peoc'helourion hag enebet ouzh implij ar feulster hag ar gwallnerzh. Ar re-mañ en em ziskouezas e Kembre, koulskoude, e-kerzh an naontekvet kantved. Parañ a reas ar "Barchiezh" ("Siartaeth") e glaouvaou Gwent e 1839; gant John Frost, eus Casnewydd, ur marc'hadour, e voe renet ur gerzhadeg eus ar ven- gleuzierion c'hlaou betek Casnewydd end-eeun.

Ul luskad dirgel evel hini "Beca" a ziskare ar c'hlovedoù-maltoucterezh war an hentoù. Padout a reas al luskad-se betek 1843 hogen steuziañ

(1) John Elias hon eus meneget dija. Ganet e 1774 e varvas e 1841.



a reas ur wech ma voe bet mouezhiet lezennoù evit lemel an taosoù-se. N'eus forzh penaos, ne oa spered broadel na zoken politikel ebet d'ar feulster arouezennel-se.

Darvoud pouezusañ buhez politikel Kembre er c'hantved-se a voe trec'h gorrek ar frankizouriezh a amsavas tamm ha tamm ar virouriezh bet harpet, da gentañ, gant Metodistiz. Echuiñ a reas ren an "yswunaid" a oa bet e-pad kantvedoù dileuridi ar boblañs e Ti ar Gumun. Diwar neuze e voe dilennet izili eus ur renkad nevez, hini ar vourc'hizion vihan a droas da Vetodistiz, da gentañ, ha da frankizourion, da c'houde.

Evel henn, a-hend-all, e c'heller diskleriañ dedroadur kedveno "emdennidi" Kembre adal kreiz an XIXvet kantved. Feuket e oa bet ar c'hedveno-se gant embann idigezh - dindan talbenn "Al levrioù glas" - eus disoc'hoù enklask dileuridi zo eus ar renkad hengounel, izili eus an Iliz stadel, a-zivout stad an deskadurezh e Kembre. Hervez al "Levrioù glas" eta e oa an'emdennidi kiriek da 'ouezoni' Kembreiz dre m'o devoa gwalleget deskiñ saozneg d'ar boblañs. Soñjal a reas d'an emdennidi eta e oad o klask tagañ ha diskar anezho hag evit en em zifenn en em drojont ouzh ar frankizourion.

Eil arbenn ar c'hemm kostezenn bolitikel a voe kraf an "digevreadur". Ne felle ken d'an emdennidi e Kembre - anezho an tri-c'hard eus ar boblañs - kenderc'hel da baeañ an "deog" d'an Iliz kefridiel. Goulenn a raent - hag edo ar mennad-se war roll ar frankizourion - distadeladur an Iliz kefridiel e Kembre.

Eveljust ne voe gallus da gedveno nevez Kembre eztaoliñ e soñj nemet a-drugarez da lezenn 1832 a aotreas d'ar c'hendereoù etre nevez e Kembre kemer perzh war-eeun er politikerezh.

Skignet e voe ar mennoziou politikel nevez gant kelaouennoù kembraek a bep seurt (kounomp bepred e oa unyezherion dalc'hmat eus an darn vuiañ eus Kembreiz), da skouer, "Yr amserau" krouet e 1843 hag a vrude ar frankizouriezh. War-lerc'h ar gelaouenn-mañ e voe embannet "Baner Cymru" a voe kendeuzet gant ar gelaouenn gentañ e 1859 evit dont da vezañ "Baner ac amserau Cymru" (1) dindan mererezh Thomas Gee (1815-1898) a oa hêr politikel Gwilym Hiraethog. Ar gelaouenn-mañ an hini eo he devoe ar muiañ a levezon a-hed ar c'hantved.

Ur gelaouenn all he devoe un tamm pouez politikel e Kembre e voe "Y cronicl" (1843-1857) a zifenne an adreizhadurioù politikel hag a harpe ar gwellaennoù pleustrek war dachenn an armerzh hag ar vuhez pemdeziek : gounezerezh skiantel, ledadur an hentoù-houarn h.a. Renet e oa ar gelaouenn-mañ gant Samuel Richards eus Lanbrynmair.

E-kerzh dilennadegoù hollek 1868 e teuas anat frouezh ar bruderezh frankizour-se. Ar pennvaodiern saoz, Gladstone, en devoa staget e stourm ouzh kraf digevreadur an Iliz stadel en Iwerzhon. Seurt mennad - se a zo aes da gompren - a oa diouzh grad Kembreiz ha na bleustrent ket, an darn vuiañ anezho - an Iliz kefridiel. Daou gannad frankizour warn-ugent - diwar

---

(1) Prenet e voe ar gelaouenn-mañ gant broadelourion war-dro an eil brezel bed er c'hantved-mañ ha difenn a reas diwar neuze ar vroadelouriezh kembreat.

tregont - a voe dilennet e Kembre d'ar c'houlz-se, en o mesk Henry Richard, kannad Merthyr Tydfil, a strivas evit ar peoc'h etrevroadel hag a c'hounezas un anv evel-se. Neuze eo e wiskas ar vrohe liv politikel arbennik he deus miret betek diwez palevarz kentañ an ugentvet kantved, kent na baras ar vroadelouriezh kembreat war al leurenn bolitikel, da vihanañ er rannbarzhioù plouezat rak amsavet e voe ar frankizouriezh gant 'sokialouriezh' Strollad al Labour er rannvroioù ijinerezhel a c'houde dibenn an XIXvet kantved.

Ar c'hemm-se e mennozioù politikel ar vro a zegasas da Gembre adarre un tamm lezennadur arbennik. Poent e oa rak war var edo Kembre da vezañ ensammet penn-da-benn en genreizhiad politikel saoz war-eeun. E 1830 e oa bet lamet diwezhañ aspadenn emrenerezh Kembre pa oa bet staget ar vro ouzh kelc'hiad-barn kornog Bro-Saoz (ar "Seziad bras" en devoa embannet ar reizh e Kembre abaoe amzer Herri VIII). Izeloc'h e tiskennjod c'hoazh pa glaskjod, e 1846, unaniñ eskoptioù Bangor ha Llanelwy hag o stagañ ouzh un eskopti nevez e Bro-Saoz. An arluz Powis a zizarbennas ar gourdrouz-se.

Gant trec'h ar frankizouriezh, avat, e teuas Kembre a-benn da lakaat mouezhiañ e Lunden lezennoù a glote gant kedveno Kembre d'an ampoent. Berzet e voe, da skouer, e 1881, digeriñ an tavarnioù da sul. Al lezenn diwar-benn ar skolioù etre e Kembre e 1889 a voe aozet diouzh ezhommoù Kembre ha lakaet da dalvezout, a-hend-all, evit Kembre ha "kontelezh Mynyw" e gevred ar vro a oa bet dispartiet diouzh ar peurrest eus Kembre e-pad tri c'hantved bennak hag



en em gavas adstaget ouzh Kembre en degouezh-mañ. Erfin, 'digevreet' e voe an Iliz stadel e Kembre ha digevarzhet ar pevar eskopti eus an Iliz er vro diouzh beli arc'hekopti Caergaint e Bro-Saoz. Gwir eo e oa renet an holl stourmoù-se hep tamm spered broadel emouez ha ne oa, a-hend-all, pouez ebet gant ar c'hempennaduricù a voe degaset en urzhiadur an Iliz kefridiel e Kembre peogwir n'oa ket ouzhpenn ur c'hard eus broiz o kavout bod enni hag o vezañ, ivez, ma oa ar spered relijiel, diwar neuze, o kilañ. Evelkent, tennañ a rae an diarbennou-mañ da ziogeliñ un dezvad arbennik da Gembre ha da greñvaat, dre se, ar spered bro.

XIV. A n d e s k a d u r e z h h a g a r s e v e n a d u r  
e K e m b r e e n n a o n t e k v e t k a n t v e d

Ar romantelezh a vroudas ar vroadelouriezh e Kembre evel er broioù europat all ; lakaat a reas Kembreiz da gemer deus en o zremened broadel, o istor hag o lennegezh kent. Al luskad lenngar-se a grogas e Kembre, e gwirionez, adal deroù an triwec'hvet kantved. E 1707 eo e tigore Edward Llwyd, diwaller mirdi Ashmok, e Rhydychen, aozer an "Archaeologia Britannica", an hent da genstudi ar yezhoù keltiek. Beleion zo eus an Iliz stadel a roas da anaout d'ar foran oberennoù skrivagnerion kembraek ar grennamzer. Unan anezho a voe Evan Evans ("Ieuan Brydydd Hir") a embannas e 1764 "Some specimens of the poetry of the ancient welsh bards" hag a eilskrivas dornskridoù kembraek ar grennamzer. Bri a roas en-dro d'ar gwerzaouerezh kembraek kozh.

Tri breur brudet eus Enez Von a gemeras ur perzh bras el luskad lennegel avzlee adenaouiñ ar spered

broadel e Kembre. Unan anezho e oa Richard Morris, kargiad e mererezh ar verdeadurezh e Lunden ; hemañ a voe levier kentañ ar gevredigezh vrogar "Cymdeithas y Cymmrodorion" a zeraouas e 1751. Arboeller e Caer-gubi e oa e vreur William hogen an hini ar muiañ donezonet a oa Lewis Morris (1700-1765) a voe enseller ar plomijinerezh stadel e Ceredigion. Tuet a-gleiz e oa mennoziou hemañ ha n'en em glevas ket re vat gant paotred ar c'hestell. Ne oa ket ur metodist anezhañ, a-hend-all, - ur maeziad a gomprenne ervat e pelec'h edo tu e c'hounid, ne lavaran ket, hag ivez ur brogarour. Un hendraouer e oa, un dastumer dornskridoù, ur saver lizhiri (kenskrivañ a reas kalz gant Goronwy Owen, un oberour all eus al luskad-se eus an triwec'hvet kantved hag a c'hellfed envel an "azginivelezh klasel"). Barzhoniañ a rae mat ken e gwerzennoù "rez", ken e gwerzennoù "kaezh" (1).

Un nebeut barzhed saoznek a genlabouras da lakaat Kembre diouzh ar c'hiz. Thomas Gray, da skouer, a embannas The Bard e 1757 ; ivez, Southey a ganmeulas Madoc, ar moraer kembreat mojennel en devoa dizoloet Amerika, a-hervez, e deroù ar grennamzer. Meur a varzh saoz a veajas dre Gembre hag a embannas, da c'houde, notennoù beaj. Walter Scott a lec'hias e Kembre ar grennamzer unan eus e romantoù "The betrothed". Diorreet e voe un doare touristerezh a lakaas Kembre da vezañ anavezet.

Hogen ne c'hellas ket Kembre tennañ kalz mad eus kement-se. A-benn 1800 e oa an helennegezh kembraek en hec'h izelañ ; kouezhet e oa e dalc'h William Owen (Pughe) hag Edward Williams. (Iolo Morganwg) o devoa kalz a faltazi ha nebeut a skiant-varn.

(1) "Rez" a dalv "dieub" ha "kaezh" "strizh".

Mirout a rejont ouzh an danvez gouizieion a ren un imbourc'herezh sirius diwar-benn yezh hag istor Kembre. O oberenn bouezusañ a voe diazezañ ar "Gorsedd y beirdd" a c'hoarias koulskoude ur roll bras en azginivelezh vroadel.

An elfennoù relijiel ha lennegel rik a voe ken pouezus an eil hag eben en azginivelezh romantel an XIXvet kantved. "Interludoù" Twm o'r Nant, da skouer, e dibenn an XVIIIvet kantved, a zo doujus evit Metodistiz ha tagus e-keñver ar bersoned ha paotred ar c'hestell. O sentiñ ouzh ar reolennoù kozh e teuas ar varzhoniezh kembraek adarre da vezañ 'dereat', lakaomp, gant Alun (John Blackwell), ur beleg, ha laiked "emdennat", evel Dewi Wyn ha Robert ap Gwilym Ddu, daou labourer-douar eus Eifonnydd.

A-benn neuze e oa bet adsavet an Bisteddfod evel gouel poblek a genstrivadegoù. Er gouelioù-se e kejas ar vrogarourion ha, zoken, Metodistiz ur wech ma voe steuziet disfiz ar re-mañ ouzh al lennegezh.

Hugh Owen (1804-1881) an hini eo a urzhias en-dro an Bisteddfod. Mab da gerent vetodistat eus Enez Von e oa-eñ. Amaezhiad e voe dindan gouarnamant Lunden ha c'hoari a reas ur roll bras e-touez Kembreiz kêrbenn Bro-Saoz.

Plediñ a reas dreist-holl gant an deskadurezh e Kembre. Diwar e atiz e savas emdennidi Gembre - evit kevezañ ouzh ar "Gevredigezh Vroadel" he doa da bal. desevel ar vugale e Kembre diouzh pennaennoù an Iliz diazezet (1) - an "Ysgolion Brutanaidd"

---

(1) Eus Bro-Saoz e teue ar gevredigezh-se hogen hengounelourion saoz zo a oa digoroc'h da rakwel kelennadur ar c'hembraeg er skol eget an emdennidi gembreat.



di-anvadel ha neptu a voe lakaet dindan evezh ar gouarnamant, hervez lezenn 1870 (1). Evit danvez mistri ar skolioù-se e voe krouet ur "Coleg Hyfforddi" ("Skol heñchañ, skol vitri"), di-anvadel ivez, e Bangor, en hanternoz, hag en Abertawe, er c'hreisteiz. Erfin e tigoras ur gevrenn skolveuriek dishual en Aberystwyth, e 1872.

An hevelep den, bepred, a strivas ar muiañ da sevel ur skol-veur glok e Kembre, diwar skodennoù ha donezonoù profet gant ar boblañs hec'h unan, ha, na petra, gant harp gouarnamant Lunden. Skoazellete e voe, dreist-holl gant ar gwiskadoù sklerijennet eus ar boblañs, moarvat, ilizourion, pastored, mezeion, tud lennek a bep seurt hag a bep dere, hogen, ivez gant ar werin penn-da-benn, kouerion ha mengleuzierion desket, kenwerzhourion vihan h.a. a felle dezho holl gellout reiñ deskadurezh d'o bugale e Kembre. Dija, a-hend-all en devoa ar gouarnamant saoz e unan pledet gant diazezidigezh pep a skol-etre en holl gêrioù marc'had Kembre e 1880 ; a-benn 1889 e oa bet krouet ivez pevar c'helenndi skolveuriek en Aberystwyth, Caerdydd, Bangor hag Abertawe.

Ar reizhiad-keleenn-se, e pep derez, avat, a oa saoznek penn-da-benn. Gant kement-se, moarvat, e vo souezhet meur a hini o c'houzout e oa kembraegerion - peurvuiañ desket war ar yezh - eus ar re a oa 'kiriiek d' ar reizhiad-keleenn-se. An dra-se a c'heller kompren koulskoude. O vezañ ma ne oa ket broadelourion eus Kembreiz d'ar c'houlz-se - da lavarout eo, ne zremment ouzh dazont politikel

-----  
(1) Evel laikourion en em zouge eta an emdennidi evel protestanted Vro-C'hall, evit krennañ levezon an Iliz kefridiel. Gwir eo e c'helle an emdennidi ober gant o "Skol Sul" a-hend-all, d'ar mare-se.

dishual ebet evit o bro - e oa didalvez krenn mirout ar c'hembraeg evitañ e unan.

Penaos diskleriañ an diouer a spered broadel e Kembre en XIXvet kantved daoust d'al lec'h bras roet d'ar yezh er gevredigezh hag er vro er c'hantvedoù tremenet ? Moarvat eo bet kiriek da se ur preder relijiel diasavel hag hiniennelour, kreizennet en-dro d'ar silvidigezh personel hepken, dic'houest da verzout amplegoù kevredadel pep silvidigezh personel, o klotañ, avat, gwir eo, gant saviad dilusk ur gevredigezh plouezet sonnet abaoe ar grennamzer. Dres, ar pezh a zo bet diank e Kembre evel e Breizh, d'ar mare ma krogas ar gevredigezh da emdreiñ en Europa da vare arreverzhi c'hreantel, e voe ur "vourc'hiziezh" 'dialuskat', gouest da vont war-raok, da gemer intrudu war dachenn an armerzh ha da ziorren ar vro gant kevalaoù kembreat piauvel ; hogen, ivez, en abeg d'ar stagidigezh n'oa ket bet tu da dolpañ kevalaoù e Kembre (koulz hag e Breizh, a-hend-all).

Moarvat ez eus diwanet e Kembre en XVIIIvet ha XIXvet kantved kendereoù etre hogen ar re-mañ ne c'hellent c'hoari roll ebet er reverzhi c'hreantel; ne oant ket gouest, dreist-holl, da gevezañ ouzh ar galloud armerzhel saoz. An diouer a renkad ren kemblac'h d'an hini saoz - hag a oa armerzhel d'ar mare-se -eo a viras ouzh an emskiant vroadel a greskiñ e Kembre. Romantel hag hiniennel e chomas an emskiant bobl e Kembre evel e Breizh, en 19vet kantved. Evit dreistvevañ ha dont tre er bed armerzhelour arnevez e tlee Kembreiz mont da Saozon, evel ma tlee Breizhiz mont da C'hallaoued.

Kement-se a ziskleir perak n'o deus ket gallet Kembreiz tennañ kement a zlejent bezañ tennet diouzh berzh-mat ha diorreadur o yezh en XVIII-XIXvet kantved.

Moarvat e ranker gwiriañ ez eo bet nac'het an tonkadur-se gant emsavioù Breizh ha Kembre. Hogen n'eus mar ebet ivez ez eus un elfenn diboell en dibab a zo bet graet gant ar re-mañ. Rak diskiant e seblanto bezañ klask adsevel ur vroad e-lec'h n'eus mui emskiant bobl ebet, diouzh ur savboent broadelour, lakaomp ; ha, diouzh ur savboent kleizelour, hini ar stourmerion a fell dezho seveniñ an Dispac'h marksour rik, ur gwir zispac'h dieubiñ, e seblanto ken diskiant all klask implijout ur yezh poblek n'eus mui anezhi, koulz lavaret, evit stourm ouzh ar sevenadur bourc'hiz, lakaet e c'hellfe ur yezh 'poblek', da lavarout eo, isdiorreet, servijout d'un dra bennak en ur sevenadur beveziñ ken diorreet hag hon hini. Setu perak n'eus ster ebet gant arnod an damkanourion a fell dezho reiñ un dalvoudegezh hollek d'an emsav e Breizh pe e Kembre pe er broioù keltiek all, dre gendodañ an elfenn renkadel ha "kenelel" anezhañ, lakaomp. O vezañ pezh ez eo saviad gwirion ar broioù keltiek gwitibunan ne c'heller ket mirout a soñjal ez eo tidel ha foll, en ur stumm, mennad ar re a garfe seveniñ un dispac'h hollvedel, lakaomp, dre hanterouriezh ur yezh hag ur vroadelezh peuzvarv, da welout, evel **re** Vreizh pe Gembre. Ne lavaran ket ne zleer ket a-wechoù ober aktoù a feiz e dazont ur vroad pe ur stroll bennak ; lavarout a ran n'eo ket onest na gwirion kafunañ e-barzh latar un areizh rinel mennet, a-hervez, da vezañ kempoell rik, ur gammed ha n'he deus, e gwirionez, poell ebet.

A-benn ar fin ez eo diazezet youl an emsaverion, e Breizh pe e Kembre pe war ar gredenn - diaes da brouiñ - e klot gwell unvezhioù politikel



a vent gant Breizh pe Gembre gant ezhommoù ha galloudegezhioù kevredadel ur boblañs bennak ; ha war ur gredenn all a-wechoù - ken start all da reizhabegañ - o deus ar broioù bihan-se ur roll bennak da c'hoari en istor pe ur gemennadurezh bennak da zegas d'ar bed. Moarvat e c'hell ar roll hag ar gemennadurezh-se - ha n'int ket anat ha na c'hellont parañ nemet da heul un daelerezh e diabarzh an emsav end-eeun ha moarvat da heul ur stourm kriz - kaout un dalvoudegezh hollek eveljust, hogen anzav a ranker neuze ez eo tidel a-grenn ar vaezienn oberiañ dilennet gant evit kefleuniañ ar /an emsaverion gefridi istorel o deus sammet warno.

Ouzhpennomp, a-hend-all, e tle ar broadoù hag ar yezhoù - diouzh ur savboent marksat - bezañ dibradet kuit, distremenet ha distrujet e-kerzh an emgann a zle disoc'hañ d'ar gevredigezh komunour hollvedel. D'ar c'houlz-se, eveljust, e c'heller en em c'houlenn ha ret holl eo d'an "Dispac'h" tremen dre bazenn ar yezh - lec'hel - hag ar vroadelezh evit tizhout ur pal ha n'en deus netra da welout ganto.

Istor emsavioù ar broioù keltiek a vo studiet diwezhatoc'h eta. Klaskomp amañ, hepken, reiñ ur c'hrennad eus ar c'heñveriadur hon eus damdreset etre istor Breizh ha Kembre e-kerzh ar skrid-mañ.

Betek an 9vet kantved n'eus ket a ziforc'h, koulz lavaret, etre istor Breizh hag hini Kembre. Adal an Xvet kantved avat e teu Breizh a-benn da grouiñ ur stad unvan e-keñver galloud politikel, ur Stad hag a c'hoario un tamm roll etrevroadel e-pad un nebeut

kantvedoù er grennamzer - evel Alba - hag a zastumo un tamm pinvidigezh, a-drugarez, dreist-holl, d'he merdeadurezh ha d'he c'henwerzh tramor.

E-keit-se, petra a c'hoarvez e Kembre ?

Chom a ra ar vro-mañ rannet etre priñselezhioù ha na dizhont ket en em unaniñ ; abred tre e taol an estren e droad el ledenez ; ar Saozon, diwar neuze, a zalc'h ar vro gant o soudarded. E deroù ar pemzekvet kantved e tarzh ur brezel dieubiñ drastus hag a echu gant un drouziwezh ; huñvreoù kaer, hepken, e chom raktresoù Owain Glyndwr. Da heul ar faezhidigezh en em gav Kembre enframmet war-eeun er reizhiad politikel saoz hep breudoù na kevrat daoubarzhek gant ar galloud kreiz saoz. Eveljust, e-kreiz ar brezelioù hag an trubuilhoù dizehan, hep Stad ebet d'o gwareziñ, n'o deus ket gellet Kembreiz ober kenwerzh na dastum pinvidigezh. Ur vroad paour int manet betek dibenn an amzervezh arnevez.

Hogen un enebenn all a zo d'an daolenn

Maz eo bet skedus a-walc'h, a-wechoù, berzh politikel ar Stad vreizhat n'en deus ket klotet ar berzh-se gant hini ur gevredigezh vrezhon unvan ; diempret e oa ar gevredigezh-se a-led hag a-sonn, etre kornog brezhoneger, ha reter galleger, etre noblañsoù gallegerion ha gwerinourion brezhonegerion. Dre se n'o deus ket gellet ar Vrezhoneg diorren o hêrezh vroadel nag ober, peurgent, eus ar brezhoneg yezh kefridiel ur vroad tud, pezh o deus gellet ober Kembreiz da vareoù zo eus o istor ha kalz pelloc'h eget Breizhiz, betek ur poent zo.

An heuliad eus kement-se eo n'en deus ket servijet an emrenerezh da netra evit diogeliñ ha

ur sevenadur brezhon gwirion o vezañ ma oa gallegerion gounezet d'ar stuzegezh c'hall eus ar re a oa e penn ar Stad vreizhat hag ar Breudoù.

Diouzh un tu all ivez, avat, e c'heller lavarout ez eo manet Breizh kalz unvanoc'h eget Kembre e-pad an amzervezh arnevez. C'hoarvezet eo gant ar skrivagner kembraek, Saunders Lewis, unan eus diazezerion "Plaid Cymru", menegiñ gant hiraezh unvanded plouezat ha katolik Breizh eus deroù ar c'hantved-mañ, ouzh he c'heñveriañ ouzh bruzhunadur ur bobl gembreat diempret gant an ijinerezh hag ar sektennouriezh relijiel ha politikel. Hogen ret mat eo gwelout ivez peseurt amplegoù a oa da unvanded speredel ar bobl vrezhon ; dleet e oa, da gentañ, d'an diouer a zeskadurezh e-touez ar bobl a zegemere beliezh an Iliz hep kemer perzh, da vat, en he buhez. Gwir eo ez eo an unvanded war dachenn ar spered ur mad hetus d'ur bobl hag anat a-walc'h eo ivez ez eo ar c'hefredveskerezh hag an diouer a breder diwanet diouzh ur frankizouriezh diveliek ha diatebek - seurt a ra he reuz hiziv - ur walenn bounner evit ur vroad. Hogen, dres, piv na gompreno ket ne c'hell ur bobl herzel ouzh ar c'hefredveskerezh nemet boazet e vije bet da gemer perzh en un emsav bennak, - o sammañ atebegzhioù hag o krouiñ, e gwirionez, ur sevenadur.

En un doare, eta, ez eus tu lavarout ez eo deuet pobl Gembre d'an istor arnevez abretoc'h eget Breizhiz ; hag un azon eus donedigezh ar Vrezhoned en istor eo rannadur ar gevredigezh vreizhat hag an emsav hiziv. Soñjal a c'heller koulskoude ne vo ket an



diempradur hag an dizunvaniezh-se - e Kembre koulz  
hag e Breizh - evit padout da viken ; moarvat ne  
vint nemet ur bazenn war-du un unvaniezh nevez  
a vo harpet war ur sichenn gevredadel kalz ledanoc'h  
eget kent pa ne oa nemet un toulladig uhelidi ha  
kloer o kemer perzh en istor.

A-hend-all e vefe aner a-walc'h d'ur bobl  
pe d'eben klask ur gentel bennak e tonkadur hec'h  
amezegez ; frouezh an dargouezh eo, evit darn,  
tonkadur ur vroad ha bevennet eo he rezid evel hini  
pep hinienn den.

+++++

GOURFENN-NOD.

Eilstummet hon eus un toullad gerioù diwar  
ar c'hembraeg er skrid-mañ. An darn-vuiañ anezho a  
c'heller kompren diouzh ar c'henskrid e unan. Graet  
hon eus ganto dre ma pledemp gant danvez Kembre ha na  
glot ket bepred gant danvez Breizh. Kavet hon eus  
gwell, da skouer, ar verañ "Arluz" eget "Aotrou" a  
zo re ledan e ster ebrehoneg ; lezet hon ivez,  
a-wechoù, e ster orin da "dTevezeg" a zo amprestet  
a-wechoù evit klotañ gant "pennvaodiern" pe "rener ar  
Stad".

A-hend-all e vo kavet an darn-vuiañ eus  
ar gerioù dibaot e-barzh ar "Geriadur armerzh ha kevred-  
igezh" hon eus embannet warlene.

=====


D i s t a g a d u r a r c ' h e m b r a e g

Anavezet eo distagadur ar c'hembraeg gant meur a hini.  
Evit a re all e kounomp un nebeut reolennoù diazez.

Vogalennoù. Evel e brezhoneg nemet an -u- a denn d'un-i-  
digor. -au- a vo distaget -ay- ( devoud e vez distaget  
-e- pe -a- e rannyezhoù zo) ; -w- a vez distaget -ou- pe  
-w- pa vez heuliet gant ur vogalenn all. -Y- a glot gant  
-eu- e deroù ur ger ha gant -i en dibenn : "mynydd" a vo  
distaget "meuniz".

Kensonennoù. -f- a glot gant -v- , ar son -f- avat a zo  
skrivet -ff- ; ar -z- a zo skrivet -dd- (kv. 'mynydd')  
Soniou arbennik : -th- kalet ha flour evel e saozneg hervez  
andegouezh.

# KARTENN GEMBRE Kontelezhioù



Plegmor  
Liverpool

Mor

Iwerzhon

MÔN

Plegmor

Kernarvon

CAERNARFON  
(Kernarvon)

DINBYCH  
(Dinbec'h)

FFLINA  
(Flint)

MEIRIONNYDD  
(Meirionez)

Plegmor

TREFALDWYN  
(Trevaldoen)

BRO-

Aberteivi

SAOZ

MAESYFED  
(Maezeved)

CEREDIGION  
(Aberteivi)

BRYCHEINIOG  
(Aberhonzu)

PENFRO  
(Penvro)

CAERFYRDDIN  
(Kerverzin)

MORGANNWG  
(Morganoug)

MYNWIY  
(Mene)



# KARTENN GEMBRE

kêrioù pennañ

